

SEITE (VISANT) SAIG HA ME

pe ar vuhez e Kleder etre ar bloaz 14 hag ar bloaz 1925

Savet eo bet an oberenn-mañ e Jersey er bloaz 1958.

Peurreñket hag adskrivet bet da vad e Ciboure Euzkadi er bloaz 1966.

I - Kenta pennad

1 - Yon (Yon a oa eun amezeg din, tad 'oa da Zaig va hamarad)

N'ouzon ket perag, ez eo deuet em spered
An eñvor ahanoh, ha c'hwi eet d'ar vered.
Kredi a ran ez eo dre m'oh bet evidon,
Penn-da-benn ho puhez eur Breizad gwirion.
C'hwi 'zo bet, sur mad, din-me, pa oan bugel,
An dén euz ar re n'eus mui e Breiz-Izel.

Va spered a zo c'hoaz, leun barr a eñvoriou
A jom beo bepred war-lerh hoh istoriou,
Istoriou a ouieh displega ken brao
Dirag tan an oaled, pa sklake ar fao.
Ha va eñvor hirio kement a verv c'hoaz
'Vel ma vije deh, ha din tri-ugent vloaz,
Gand ho kontadenou, ho marvaillou koz
Hag a gonteh deom-ni, da zul diouz an noz.

2 - Saig (1)

Yon ar hastell-Dero (2) 'oa eun ano mad.
Va brasa kamarad 'oa Saig e vab.
(Eet eo, siwaz, ivez, pell 'zo d'ar bed all
An Ankou digalon, a falh 'vel eun den dall
En abeg da Zaig, me 'rede aliez
Beteg Kastell-Dero : Ne veze ket di□z.
Va zi, an Ogellou, a zo tost d'e di ;
Atao gand plijadur, e reden-me di.

- Peleh ema Saig ? a houlennen neuze.
- Ema gant ar zaout o leurachi (3) du-ze.
“ Kee 'ta beteg ennañ, kee 'ta buan d'e gaoud,
“ Hag e hell o hraouia, ha goude ma kar,
“ Mond ganit da hoari, e penn ar hrañj-karr.”

Ha ni a hoarie, eno, pell hag hir
En eur ruill hep skuiza, kanetennou dir.

(1) **Saig**: Fransag, Fanchig - (2) **Ar hastell-dero** : Kêr Yon ha Saig - (3) **Leurachi**

(Relachi): Lakaad ar zaout da beuri war ar riblennad leton a lezer etre ar hleuz hag an douar labour.

3 - An drailléréz-lann

A-wechou inouet, ni 'rede on daou
Da zelled ouz Yon-Gorr 'n eur speurenn, er hraou,
Pe o trailla irvin, pe ruta, pe banez,
Pe ivez d'e zikour da drei an drailléréz:
An drailléréz-lann, hag a garem kement
Trei dezi he rod pa sklake he lemmenn
Al lann glaz a bile, a-vernious, dindan,
Mesk-ha-mesk gand ar yeot : yeot tener ha glan.

4 - Morian

Bez' e oa ouspenn, Morian ar marh du,
Chentil braz ha reiz (1), ne roe ket taoliou ru.
Ennon nag a fouge, pa vezen war e gein ;
Livenn ar marh du a bike 'vel an drein.
Nag e c'hoarze Yon, p'or gwele ken rampet,
Krog e moue ar marh, hag hemañ o vrammed.

Pa veze Yon-Gorr du-mañ, o labourad,
E tigase gantañ, Saig-Korr va hamarad.
Neuze 'vije din-me, kas ar jeu en-dro,
Ha Saig a ouie senti ouzin-me, bep tro.
Morse, etrezom-ni, ne vije tamm kruz (2)
Rag ni en em gleve, evel daou louarn koz.

(1) **Reiz** : Trankil, êz da gas - (2) **Kruz** : trouz.

5 - An toer

Pa veze Tad Saig war-dro an toennou,
(D'ar poent-se 'oa soul, krevier an Ogellou)
E vezem-ni gantañ, atao ouz e heul,
Hag o sevel dezañ, kolo war ar skeul ;
Kolo eün ha gleb 'veze gantañ fourret
'Barz an doenn fall, ha da houde touzet
Gand eur falzig lemm, ken brao ha ken buan,
Ka kribet goude-ze, gand eur rastell vihan.

Da dei krevier soul, n'oa dén da vond warnañ,
Hag er hontre, a-béz, 'vije goulenn dezañ...
A ! m'ho-pije bet, 'vel m'am-eus-me gwelet
An toennou koz bet gantañ nevezet ;
War o livenn gein e lakee taouarh glaz.

Goude e helle c'hweza an aveliyou braz !
Korventenn ebed, a-ziwar an doenn,
N'he-dije dibradet, birviken koloenn.
Eur hraou, war e lerh, a veze ken fichet
Hag ar vraoa verh, da zeiz kaer he eured.

6 - Koan

ÇÊGwazed, prést eo koan ! » Ha ni ouz an daol.
Saig atao em-hichen ; goude, Pñr pe Baol.
Sin ar Groaz da genta. Neuze beh d'ar fars !
Kig-ha-fars a garem, hag e plantem e-barz,
E-leiz or hrabanou, ruz ha druz or mourrou.
E-keit-se, ar hi, a skrabe or boutou,
C'hoant dezañ lakaad e fri e-barz ar pod,
Eun tamm askorn atao, a veze e lod.

Da eva, d'ar poent-se, ne vije nemed lêz ;
Lêz dous pe lêz goedenn pe lêz ribot fresk.

Ni 'ranke chom peoh, ni, ar ribataillou.
Ni 'gare avad, selaou ar marvaillou.
Pa groge Yon-Gorr, da gonta istoriou,
Ni a ouie brao digeri or skouarniou.
E-keit-se, nemetañ, ne vije mui klevet.

Nag e ouie konta, an traou koz tremenet ;
O lakaad birvidig da veva dirazoh,
Evel sinemaïou, ha marteze bravoh.

E-keit-se, ar merhed a skaote an traou.
Med pa reent trouz, ganeom e klevent traou.
Evel eur strobinnell deom atao e veze,
Ha da heul e vouéz, or spered a rede
Da Vrest, da Vontroulez, Kastell pe Rosko
Landi hag ar Merzer : Oll gñriou ar vro.

Hep karr-nij, nag oto, (a-veh m'oant ijinet)
E oa bet, gand Yon, pep kornad vizitet.

Med n'eo ket koulskoude, war bankou ar skol,
Eo e-nevoa desket, kement a draou drol.
Ar bern traou 'vez hirio, dre heg pe dre gaer,
Plantet en or pennou, a voug pep tra gaer.

Setu 'vel Yon-Gorr, bremañ mui ne gaver
Eun den e nebleh hag a ve marvailler.
Pebez damant allaz ! d'ar vugale geiz

He ne hellont komprenn, or yez-ni, yez Vreiz.

Klozet eo, da vad, teñzor ar marvailloù,
Rag ar mammou-koz gand o gallegachou
N'hellont mui displega an teñzor a furnez
O-deus bet kutuillet, héd-a-héd o buhez.

7- Laboused

Yonn-Gorr deom a zeske, deom atao on-daou
N'oufeh kredi biken pegement a draou :
Ni 'veze war evez ouz kemend a lare.
Ni 'veze war war evez ouz kemend a rafe.

Deski a ree deom ano al laboused,
Penaos o anaoud diouz o nij, o gweled
Diouz o hanaouennou, ivez diouz o liou,
Diouz o neiziou karet, ha c'hoaz diouz o viou.

Desket e-noa deom ober chapeledou
Gand ar viou a gavem e goueled an neiziou.
Koulskoude, e hrogne, pa wele dineiza
Viou an evnedigou, viou ar re vihanha.
ÇÊN'it ket », a lavare,« da zineiza 'r voh-ruz,
Nag al laouenanig, pe c'hwi 'ouelo druz ».
ÇÊAr voh ruz », emezañ,« war lein Menez-Kalvar
Gand e voh a zehas, tal Jezuz er hlahar.

ÇÊHag al laouenanig, gand e veg a dennas
Eun drên euz e lagad. Doue o bennigas.ÊÊ

Gantañ on-eus desket, penaos ha peleh
E vez neiz pep labous, én traoñ pe en neh.
Ar filiped a glask toullou ar mogeriou ;
Gand yeot seh ha plu eo e reont o neiziou.
Hag ar gwennilied e korn ar prenester
A oar sevel ti kenkoulz ha mañsoner.
Ar piked, ar brini 'barz ar gwez uhella
A zav mellou neiziou, diêz' da zifoupa.
Hag al laouenanig, ouz piltosou koz,
A oar 'tuez an ilio, reñka eun neiz kloz.
Med ar hornigelled, laboused Sant Per,
Er parkajou gwiniz eo a guz o hêr.
El lann hag er melchen, eo e neiz ar glujar,
'Vel ma ra ar yar, a-resed an douar.

Diwar-benn ar mouilhi hag an evned all
Ni a zo bet gantañ, desket kemend-all.

- ÇÊAr gougoug », emezañ, pebez labous drol !
Ma plij deoh he hleved, na dit ket d'he skol.
Dozvi 'r he viou e neiz ar re all,
A rank he servicha: Pebez labous fall !ÊÈ

Gantañ on-eus klevet: ÇÊEtre meurzh hag ebrel
E teu ar gougoug war eün a “ vichebreul “ »
Med morse koulskoude n'on-eus gellet goud
Pe vro eo “ Michebreul “ peleh ha pe roud.

8 Pardoniu

Gand Yon, ni a rede, a-spered evel-just,
Da bardon Rumengol, a-dreuz henchou rust.
Ne veze ket, neuze, goudronet an henchou.
Mond a ree an dud, war o zroad, a-verniou;
Hep damant d'o foaniou hep damant d'o zreid,
Gand feiz e valeent da n'eus forzh pegeid.

Ha gantañ, pep pardon, deg leo tro-war-dro,
Oa bet darempredet, abaoe pell'zo;
Pardoniu Kerzean, Sant Yann, Lambarder,
Lokrist an Izelve ha pardoniu Kleder...

En e vleud e veze, pa gonte gand jestrou,
C'hoariou koz e amzer en-dro d'ar chapeliou;
Sach war ar gordenn, pe c'hoaz c'hoari bouldou,
Redadeg ar hillog, pe c'hoari ar hillou..
Eur gwenneg an taol : Beh 'ta paotred d'ar jeu !
Beh 'ta ! hep diskregi ! an noz teñval a deu.

Hag e konte deom-ni, pegen trist e kave
Ar c'hoariou bremañ : c'hoariou bugale!
Hag a-wechou ivez, me 'gréd eun nebeudig,
Da goulz ar pardoniu e kave eun dousig
Goude eur bedennig da zant koz ar chapel
D'ar gêr e tiredent, ha kazel-ha-kazel
Hag hemañ d'eben a brene bonboniu,
Hag an noz, moarvad, a wele o fokou...

Neuze 'vad, e kroze, kreñvig brao e vouez;
ÇÊHirio n'eo mui heñvel. Onestiz 'zo rouez.
Gwelit ar re yaouank ! Ma n'eo ket eur véz !
O vertuz a-ispill ouz begou an dréz !
Da beleh ez eont bremañ da glask o flijadur ?
Hag e ve d'ar pardon ?... N'eo ket m'hen asur.
Ha deom-ni, bugale, e vouez o sorohad
A groze 'vel kurun, a roe deom eur stokad

Evel-se, goustadig, onestiz ha furnez
A verke on ene, kent merka or buhez.

9 - Foariou

D'e heul c'hoaz ez eem, gand kemend a herder,
Pe da foar an Neah, pe da foar ar Merzer.
Foar al Lukaz ivez, pe c'hoaz ar foar yén.
Ar foar-ze, e Kastell, a blije da bep dén.
Ha foar Verven ouspenn ha foariou braz Landi !
Neuze, deoh m'hen asur, e c'hoarie ganti !

Plijoud a ree dezañ, horrol eo ! ar foariou
Gwerza saout ha kezeg, ha mond d'ar marhajoù;
Eur maout, a lavaran, ha nann eun dén dall !
Goud a ree diarbenn, pep tro gamm ha fall
Ha c'hoari, me 'gredfe, troiou d'ar Hallaoued
A zeufe d'her hemer evid eur genaoueg.
Ha pa renke prena 'teue gantañ d'ar hraou
Loened euz an dibab, he n'eo ket koz traou.

Diou vuoh ruz e-noa, diou vuoh bouetet mad,
Flour warno ar vlevenn evel yeot ar prad.
Ganto e varvaille, ha Ruzig ha Baillenn
A heje o fennou 'n eur gas kuit ar helien.

- (1) **Foar an Neac'h**: Foar vraz Montroulez, war eun uhelenn a -zìoh kêr-Neah: Uhel -
- (2) **Foar ar Merzer**: Unan euz brudeta foariou koz Bro-Leon, er Merzer, e-kichenn Landerne -
- (3) **Foar al Lukaz**: Foar Sant Lukaz, e Ploueskad, a veze anvet ivez Foar ar plu -
- (4) **Ar foar yen**: War-dro Gouel Mikêl, e Kastell-Paol. Klevet em-eus aliez lavared : « Goude hañvig ar foar yen, Hañvig ebed ken ».
- (5) **Foar Verven** : Berven e parrez Gwitevede : eur foar, dreist-oll evid ar zaout hag a veze darempredet kalz. Eno ez eus eur chapel gaer-kenañ d'an Intron Varia...Gwechall e oa eul leh a belerinaj .
- (6) **Ar Hallaoued** : Er foariou e veze anvet gallaoued ar re na gomzent ket brezoneg, a deue peurveulia euz a-bell.

10 - Laeron

Méd èn-dro d'ar foariou 'vije kalz darvoudou
Hag amañ, adarre 'veze Yon 'n e voutou.

« Meur a wech, èn noz, 'n eur zond euz Montroulez;
'Z eus bet war va lerh gwall dud 'klask va laerez.
Eun taol fouet da Laouig, ha ni d'ar haloup ruz,
Ken e strinke ar vein, hag outo tan ruz.

Eur wech all eur hoz-laer, krog e lost ar harr,
Dreist an tal a glaske teuler e ziouharr.
En taol-mañ, emezon, e vo tomm d'am lèr
Eur flipad da Laouig : hemañ a lak herr.
Eur mell taol fouet d'al laer, hag-eñ war greiz e gein
O ruill war an hent-praz, ha pladet war ar vein !

Ahanta ! amprevan, lampon, boued ar groug !
Me 'zesko dit kanfart, klask dond war va chouk ! »

Ha Yon-Gorr a hoarze ha ni gantañ ivez
Daoust deom beza spontet, an eil hag egile.

11 - Bleizi

Ni a gare, da zul, war-lerh ar gousperou
'N em voda aliez, ni oll, bugaligou,
Re vraz ha re vihan, paotred, merhedigou.
Da zelaou Yon-Gor o konta istoriou.

Eur zulvez 'm-eus soñj, e houlenñ pep hini,
Ma ve deom displeget kontadennoù bleizi.
Edom e miz kerzu, berr-kenañ an deiz,
Oll en-dro d'an oaled, Yon Gorr en or hreiz.

En oaled e verve eur podad boued moh.
E tour braz an iliz, e sone ar hloh;
Ar bourg a oa tost, kloh an noz a zone.
Chan Gorr a elumas al lamp koveg. Neuze,
Penn-da-benn d'an ti, eur reñkad gweleou;
Pevar gwele kloz, a oa en tu dehou.
Eun all ouz an daol e zor fañfarluchet ,
Ha genou pep gwele gand dantelez boñtet,
Warno tachou keur a lintre 'vel stered
Ouz sklêrder an tan a zeve en oaled.

Setu Yon da gregi gand e gontadennoù

Keid ma pare warnañ a-bep-tu, ar sellou.

ÇÊN'eus ket keid-se c'hoaz, bugaligou geiz,
'Vije war-dro amañ, gwelet meur a vleiz.
Bremañ n'eus ket ken, rag-se, bezit dineh;
Ne vo deoh diframmet, divesker na divreh.
Med tregont 'vloaz zo, e oa lemm o skilfou.
Meur a hini ganto 'zo bet eet da stripou.

Fri tano ar hi, o zante o tostaad
Puchet war e lost, izel e skouarn plad,
E fri gantañ savet e kroge da yudal,
Yudal ken truezuz, ma ree deom-ni skrijal
Pep ki e-noa neuze, war e golier piket,
Tachou a-reñkadou, o fennou hir veget.
Rag ar bleiz ouz ki, pa vez oh emganna,
D'e houzoug, bep tro, eo e lamm da genta.

Hervez ma vez kontet, e spont ouz an tan.
Ouz an dud, koulskoude, ne ra ket a van.
Nemed c'hwi a glaskfe taga e vleizigou.
Neuze, taolit evez ouz e daoliou skilfou.

Pa vez warnañ naon-du eo e vez ar wasa.
Deñved a blij dezañ. Goud a ra o laza.
Ha prim o diwada, re vihan, re vraz;
N'eus netra evitañ, o kaoud gwelloh blaz.

Evid o distruja, e reed toullou trap,
Dindan deliou maro, 'n eur riboul bennag:
Eun toull don en douar, en traoñ ibiliou lemm;
Eun toull hag a veze, kuzet brao dindan foenn.
Pe gand deliou seh ha gand bleñchou tano.
Hag ar bleiz 'n eur dremen, a goueze diwarno
E foñs an toull-don, war horre ar pikou
A dreuze e gov, e houzoug, e vemprou.
N'oa ket a-walh d'e lakaad da vervel.
Pa gleved e yud : pep hini da hervel
Ha neuze gand ferhier e veze peurlazet.
Ha kerkent goude-ze, buan diskrohennet..

Va zad-koz, emezañ, e-noa eur krohenn bleiz.
Roet eo bet, avad, d'eur pillaouer eun deiz. »

(1) **Chan Gorr** : Pried Yon Gorr, mamm Saig -

(2) **Fanfarluchet** : Kizellet warnañ bleuniou ha traou all ken kaer -

3) **Bontet** : Stanket: Pa veze tud er gwele an nor a veze serret. Med e-pad an deiz, an nor digor braz a veze stanket gand dantelez -

12 - An toull bleiz

Ha Yon, war e buchou, goustad a gendalhe
D'on lakaad da skrija : «« Selaouit bugale,
Hervez am-eus klevet, va zad a gav din
A zo bet darbet dezañ, ober eur gwall fin.

Edo o tistrei, 'kreiz eun nozvez teñval;
Euz friko Frañsaig, mab Per a Gêrenval,
Pa ruill 'n eun taol kont, hep gouzoud penaoz,
En eun toull-trap kuzet, e koajou Kerzaoz.
Ken don 'oa an toull-ze, ma n'helle dond er-mêz,
Hag en toull 'oa ivez... Petra ? O paour-kêz !
Eur bleiz, eur mell hini ha du gand an naon !
Em zad, êz eo kredi, e savas eur pezh aon.

A-drugarez Doue 'vid krohenn e gein,
Ne oa en toull trap-se, nemed pikou brein.
Med red e oe dezañ, 'vid mired e vuhez
Ouz ar bleiz marnaoniet, 'n em ganna didruez.
Ar bleiz a oa kreñv, ha lemm e ivinou.
Va zad n'e-noa ken nemed nerz e vemprou.

An emgann a grogas, 'kreiz an deñvalijenn.
Ne oa ket eun ebat (5), èn noz, en em zifenn.
Ar bleiz koz, da genta, a lammas 'n eur yudal.
Med va zad her stlapas e penn an toull teñval.
Gand e voutou e sko... taoliou dorn a lope
Ar bleiz, diouz e du, kemend all a groge..
Ar gwad ruz a rede, war grohenn an dén.
A ! mar gellje padoud, teir eurvez hepkén !
Tud, neuze, marteze, a glevje an trouz,
A zeufe d'e denna euz an toull-trap louz.
Da hortoz 'oa red ober euz ar gwella;
Derhel penn d'ar bleiz, klask atao e fêza.
D'ar fin oll, va zad, a oa deut ken skuiz
Ma rankas diskuiza, ha mond war e hiz
Ar bleiz, er penn all, a oa tehet ivez.
Hag eno, hep fiñval, e hrogne, e yude...
Va zad a hortoze ma lammfe ar bleiz...
Pa zavas an heol, hag avañset an deiz,
Tud a zizoloas, an toull-trap er hoad.
Didrouz e oa deuet.. ennañ dén war droad
En eur penn, va zad, skuiz maro ha... kousket.
Er penn all, ar bleiz... maro - mik ha morzet. »

- ÇÊ Va Doue » emezom, devehiet eun tamm.

Or halon a lope, ennom, d'an daoulamm.

Goude fin an istor, ni 'ree c'hoaz ouz Yon,
N'ouzon ket ped goulenn da skañvaad on aon.
Peur eo bet gwelet ar bleizi diweza ?
Perag mui ne weler a vleizi dre amañ ?

- ÇÊN'eus ket mui a vleizi, lazet int bet toud..
Ha bremañ, bugale, pep hini en e roud.
Ha disul, adarre, e vo eun istor all.
Nozvez vad, bugaligou ! kenavo ar wech all ! »

- Ç Deoh ivez kenavo ! Bennoz Doue deo h!
O ! nag a blijadur, on eus bet ganeoh ! »

13 - An distro

An noz du 'oa kouezet, méd ni 'oa eur vandenn.
Beh a veze warnom o kaoud ar wenojenn.
(Neuze war-dro du-mañ, e oa fall an henchou,
Leun a bri, a vouillenn, a fank hag a boullou.)

Goude Feunten-Veur, tamm riboul ebed kén !
Hag eno, leiz an hent, leun bourr a zour yén.

ÇÊDiwall mad ouz an toull ! lak amañ da votez ! »
A lavare Sinig, da Ber pe da Vaodez...
'Vidon-me, atao 'veze prest da sponta,
Dirag eur bod lann, war ar hleuz o heja.
Eul laer eo a welen, hag o vond da laerez
Evel laer an istor, war hent-praz Montroulez.
Em bruched, va halon a lamm diwar herr.
Nag e vezer eüruz pa baken ar gêr.

Er gêr 'klevem traou gand or mamm a-wechou
A hortoze da goan oll dud an Ogellou
ÇÊE peleh oh chomet, leun a bri, a strob ?)
Ema koan o yéna, hag ar haz er pod. »
ÇÊO va mamm, ma ouijeh, na pegen kaer istor
On-eus-ni adarre klevet gand Yon-Gorr ! ÊÊ

He ne veze kaoz, 'pad koan gand pep hini,
Nemed euz Yon-Gorr ha toull-trap ar bleizi.

(1) **Feunteun-veur**: Ar gêriadenn dosta d'am hini -

(2) **Strob**: Loustoni paket a-hed an hent -

(3) **Ar haz er pod**: Da lavared eo ne jom netra kén, lipet ar pod gand ar haz.

14 - Al lore a gan

Eur zulvez war-lerh, da gleved Yon Gorr
Ni 'lamme adarre, dreist treuzou e zor:
ÇÊKontit deom 'ta istor “Al lore a gan“
- Mar karit, bugale, med deuit tost d’an tan.
Ha Yon gorr a grogas 'vel ma ouie ober :

ÇÊGwechall goz, emezañ, bremañ 'z eus pell amzer,
E oa ‘n eur hoad braz, eur wrah koz o veva.
En eur hastell kuzet, dindan ar gwez brasa.
Hag honnez, ar wrah-se, a helle ervad
Paka kement dén a dremene er hoad ;
O stlape ‘n eur helorn, hag o debre goude...
Dirag kén braz krizder, e laras ar roue :
“Hanterenn va danvez a roin d’an hini
“A lazo ar wrah-se, he stlapo d’ar brini..”

Meur a hini a glaskas, med paket bep tro,
Dén ebed da houde, n 'o gwele en-dro.

Ar wrah koz he-doa eur ”plah” anvet Sinig,
Eur plah yaouank-flamm, divorfil ha koantig,
A veve er hastell, hep galloud mui tehed;
Gand ar wrah koz ennañ, e oa strobinellet.
Med Sinig, Plah fin, a veze war evez.
Gweled 'ree ar wrah, o vond ingal bemdez,
Da gornig al liorz, hag eno e komze,
Pell hag hir, aliez, gand eur bodig lore.
Sinig bremañ 'ouie e helle ar bodig
Kana ha kaozeal pa lared goustadig :
“ Bodennig, bodennig,
Lavar din eun tammig.
Petra 'zo tro-war-dro ?
Lavar din piou 'zo beo ? “
Ha dre guz, eun devez, Sinig o tostaad
A zistag ar homzou, distagell ha mad :
“ Bodennig, bodennig,
“ Lavar din eun tammig,
“ Petra 'zo tro-war-dro ?
“ Lavar din piou 'zo beo ? “
Hag ar bodennig lore a ganas :... eun dudi !
Dezi e lavaras : “Joa am-eus d’az saludi !
Petra a glaskez, plahig ? Gra ouzin goulennou
Ha da forz pehini, me a raio respoñchou.“
“Me 'garje mond kuit. Penaoz ‘n em gemered
Ma chomo ar wrah hep gouzoud on tehet ?“
- “ Selaou mad ahanon, ma lavarin dit

E helli êz-kenañ en em denna kuit
Er hoad d'ar mare-mañ 'z eus eur paotr o tond.
Bigornig eo anvet, paotrig fur ha dispont.
Te her havo kuzet, astennet 'n e hourvez,
E-kichenn ar hastell, e kornig an douvez.“

Ha Sinig a redas... a gavas Bigornig.
Med na pegen bihan ! eur gwir gornandonig !
“Deus ganin, emezi, med taol kalz a evez,
Ar wrah a zo kousket; dihuna 'hell honnez.
Lore a gan, du-hont, a lavaro penaoz
E helli 'n em gemer, 'vid paka 'r wrah koz:
“Bodennig, bodennig,
Lavar din eun tammig,
Pehini 'zo tro-war-dro ?
Lavar din piou 'zo beo ?
Hag ar bodig lore a gomzas evel-henn :
D'ar plah ha d'ar paotrig, o-daou mantret krenn :
“ Vid paka 'r zorserez, tenn diwar he bleo
Ar spillenn aour-melen ha goude-ze, kleo;
Netra ken ne hello, he nerz a vo teuzet.
Ha nerz ar zorserez, a-béz a vo dit
Hag ez ay diouz Sinig, ar strobinell kuit.
Kemer eun deliennig, a-ziwar va bodenn.
Ganti 'vezi diswel, hag e helli tremen
Dirag ar wrah koz, heb na vijes gwelet....
Bremañ, chañs vad deoh, bugaligou karet. “

Ar wrah a oa o tond euz dor vraz he hastell.
Ganti sonn he fri hag e-leiz a strakell.

“Tud a zo er hoad. Me a zant kig kristen.
Mall a zo din o lakaad, em horv braz da ziskenn.“

Sinig Paour a grene. Ar wrah-koz e kounnar
A yude 'vel eur bleiz, ma krene an douar.
Bigornig 'n he hichenn, a-stok ouz ar wrah
An deliennig lore a oa én e zah.
Kerkent e torr warni, deut dezi c'hoant kousked
Hag eh en em astenn, evel ma ve mouget.
Bigornig, dioustu, a gemer ar spillenn,
E nerz a gresk souden, e vent kemend all.
Setu-eñ paotr faro, evel ar re all.

Stleja 'ra ar wrah, beteg puñs an ivern,
Hag her stlap e-barz, diwar bouez he uvern.

Sinig ha Bigornig, an eil hag egile,

Goude a zimezas e palez ar roue.
Euz kastell ar hoad e rejont o maner,
Eno int bet eüruz, ar rest euz o amzer.
Marteze, bugale, 'maint eno bepred
Nemed gand an ankou, sammet 'vijent bet.'”

(1) **E-leiz a-strakell:** Kalz a drouz

16 - Morian

GandYon-Gorr, ouspenn, ni a zeske anaoud
Penaos kas ar hezeg, pe diwall ar zaout.

Ar hezeg friantuz 'oa da ziwall outo.
Re a gerh 'n o hrohenn, amzer re vag dezo.
Ar gwella'oa d'ober eo bemdez o lakaad
E limonou ar harr d'o skuiza ervad.
Rag neuze, goustadig, e teuent da zeski
Beza reiz ha sioul, goude kalzig c'hwezi.

Gand ar marh Morian, hag a oa ken reiz,
Ni a helle c'hoari sul-houel ha bemdeiz.
Yon a zeske deom-ni, korda brao e lost,
Blañsonad e voue, ha chom outañ tost.
Lakaad dezañ gwesten, hag e zigabestra.
E sternia ouz ar harr ha goude disternia.
Pignad war e gein, a-ziwar lein ar hleuz,
Krog mad en e voue, en eur lammad a-dreuz.
E gas d'ar park leton, war ar peuri mad
Ha lakaad an hual warnezañ ervad,
E lakaad da drodal, ivez da zaoulammad.
Neuze e vije red diwall mad da bilad.
Eur wech, soñj am-eus 'n eur ober evel-se
'M-boa paket eur gwall-lamm, ha bet kalz a gerse.

(1) **Amzer gag:** Amzer dilabour

16 - Ar zaout

Beza war-dro ar zaout a zo kalz diriskloh.
Bez' e vez ar re-mañ, peurveuia sioulloh.

Gantañ on-eus desket, penaos drailla boued;
Penaos er park leton, serri mad ar gloued.
Med diwall ar zaout 'veze deom pinijenn,
Rag gandYon, ni 'ranke chom atao 'n o hichenn.
Plijoud a ree deom sacha war o bronnou,
Ha lakaad lêz livriz da strinka 'n or genou.

Méd Yon a zifenne ober kemend-all:
- ÇÊHonnez 'zo, emezañ, paotred eur hiz fall !
Deskit 'ta, mar karit, penaoz goro brao;
Sachit gand ho taou zorn war ar bronnou teo.
Diwar ho skabellig, lakait al lêz dous,
Da strinka er zaill, en eur ober trouz.

Pa ziwallit ar zaout war hlazenn ar park
Chomit krog en o fenn: Na dit ket d'al lark.
Diwallit gand evez, pa 'z it d'ar prajeier
N'ez afent da laerez war draou ar parkeier.
Dañjeruz e vefe o lakaad da beuri,
War eun dachenn velchen pa vez glizenn warni. »

Ha gwir a lavare, rag eur wech 'm-eus gwelet
Yon Gorr 'h ober eun toull e kov eur vuoh koeñvet.

17 - Fest ar vaz

Pa gomzan euz saout; me 'rank konta deoh
A bep seurt eñvoriou : Selaout gand a reoh.

Goude ar gousperou, bep sul 'vezem toud
Euz Leslaou, 'n ogellou, Feunten-Veur, Toull brout
Euz ar Hastell-Dero, paotred ha paotrezed,
'N eur ziwall ar zaout o c'hoari, o redeg,
E koadig Sant-Ke, er prajou tro-dro,
Hag eno e veze plijadur bep tro.

Méd kredi a hellit, n'eo ket anevaled
Eo a raje deom-ni beza neuze chalet.

E-keit ha ma vezem o c'hoari ruillaig
War brad Leslaou-vihan, ha mezo eun draig
(Ar foenneg-se, eno, euz an neh d'an traoñ,
A oa gand he flourenn eun tamm mad a draoñ)
E veze ar zaout, dreist ar hleuz o lammad,
War melchen ha panez, o zeodou o falhad.
Pe a-wechou all o sevel o lostou,
Hag o vond e breskin, beteg an Ogellou.

War o lerh, ni 'rede: re ziwezad atao !
Ha mond d'an ti, neuze, ne veze ket brao.
Rag er gêr e pakem, aliez, allaz !
Fest treñk ar geuneudenn, pe c'hoaz fest ar vaz.

18 - C'hoariou

E koadig Sant Ke : O pebez koadig brao !
Gwez-kelvez dreist-oll, haleg, drez ha skao,
Hag ivez pa zoñjan, eur wezenn vesper.
Disterig marteze, med a roe esper,
Da dañva he frouez, pa zigoueze deom chom stag
A zilerh al "laeron" unanig bennag.

Ar helvez, avad, a veze peurvuia,
Leun-bourret a graoñ, hag euz ar re wella.
Med keit ha ma vezem o tiskar kraoñ-kelvez,
Ouz ar zaout adarre, nikun ne daol evez.

C'hoariou all a gavem : Ober suterézéd
Gand ar bodou haleg, ken tener krohennet
Pe c'hoari koukoug e-kreiz ar hoad stank
Pe c'hoari branskellad ouz bodou eur brank.

C'hoari branskelladig a yee d'ar paotrezed.
Med ni 'gave gwelloc'h mond er hoad da redeg.
Da bignad er gwez evel kizier spontet
Kuit da gaoud war-lerh ar bragou difoñset.

Ne droe ket atao an traou ken diroufenn :
Ar merhed aliez a dreñke ar zoubenn.
Emgannou a veze, sachadeg bleo ivez
Ha leñv forz pegement ha fachiri goude
Ha kuit 'n eur lavared d'egile ha d'eben :
Ç Me flato d'am mamm! Te 'bako diganén. »

Ne bade ket an trouz. Setu peoh adarre !
Hag en-dro, ar c'hoari, ken buan a groge.

19 - Gourenadeg

Meur a wech ganeom e veze gourenadeg,
Etre ar ganfarded, war leton ar foenneg.
Evid gouren ervad, al lezenn a zo striz.
Med ni a hourene, pep hini d'e hiz.

Eno 'veze krog, ha ken waz emgannou,
Ken e strake 'n dillad, dre nerz ar hrabanou.
Evel diou zilienn en em gorvigellet
An eil ouz egile, e wele ar baotred,
O sevel, o koueza, o ruilla, o tourtal
O sacha, o lammad, o heurta, o rohal...

E-kelh, en-dro dezo, ar re all o selled,
Ar voused o hisa, hag ivez ar merhed:

ÇÊAta Pér! Ata Saig ! ahanta! ahanta!
Lamm a zo ! lamm a zo ! hopala ! hopala !...

Pa zave pep pabor a-ziwar ar foeneg
E vezent ken ruz ha kribell ar hilleg
Ken waz krogadou a veze da houde.
Ar re grenn da genta ; ar re vihan ivez.

Ped roched, ped bragez a veze diskolpet ?
Dister dra evidon pa jomem didortet.

20 - Siliaoui

A wechou ni paotred, a yee da zilaoui
E goueriou ar foeneg, gand saill pe voutigi.

Lod ganto boutigi, a stanke ar goueriou,
Ha lod all diarhen, troñset uhel o bragou,
A vreze al lehid, a lakae ar zili
Da vond d'en em denna e foñs ar boutigi.

Eur zilienn bennag, a-wechou a baked.
Med a besked bihan 'veze leun ar bouteg.

Pa errue ganeom paka eur zilienn,
Va zad a ree ganti eur gaer a fritadenn.
Ha pep hini 'hanom, a lipe e vourrenn
Pa veze o tiskenn e-biou e gorzailenn.

Pa skaote an heol, e-kreiz ar bouillennou
Dre laer, ni 'ree soubig, war or penn er poullou.
Ni 'zave ahano, mastaret a vouillenn,
Eur bann-heol hepken, o helei or hrohenn.

21 - Cheu vraz

A-wechou, d'ar goueliou, e veze “ Cheu vraz “
Mond a reem da redeg dre greiz al lann glaz.
Darn a veze konikl, louarn, broh pe had,
Darn all chaseourien gand péb a vaz vad.

Er “jeu-ze“ ne veze, nemed paotred hepken.
Ni oll a haloupe, euz eur warenn d'eben,
War or puch, ni 'dreuze ar hleuziou uhella,
Dre ar spern, ar strouez, hep damant da netra.
Youh a veze ivez, sklakèrez ha kri !
ÔMe am-eus paket da u! Me am-eus paket tri ! Ô
Or pennou ruz tan, goloet a hwezenn,

An deiz a dremene, evel eur gorventenn.
Nag heol tomm, nag avel, na glao braz, na kurun,
Na sponte ahanom, na harze ouz nikun.

Ni 'zistroe d'ar gêr, goude seurt abadenn,
Gand roud pikou lann atao war or hrohenn.
Hag aliez ivez, ar pezh a gouste ker
Bragou or paltok diskolpet gand drez.

22 - Patati

D'an oll c'hoaz e plije c'hoari patati,
Hag a veze ganti kemend-all a gri!..

(En abeg d'o lostou, ar merhed 'vel-just,
Ne hellent ket c'hoari. Dezo e oa re rust.
Med ganto e plije, war ar prad azezet,
Selled en eur jaokad evel komerezed).

Unan euz ar baotred, a blege e gein,
Eün-tenn e zivesker, hag ilin ouz daoulin.
Ar re all a rampe, en eur lakaad herr,
Ha ploup ! eul lamm dreistañ ha taol seul d'e rer
Pep hini a ranke, war-lerh ar paotr kenta,
Lavared heb mankoud e heriou farsusa,
Ha jestroù da drevez, lod anezo fentuz..
An hini a vanke, pe ne veze sentuz,
A gemere e blas, digand ar paotr pleget
Ha dreistañ kerkent, ni 'zalhe da reded.

'Vel kurun ha tonnou, o ruill war ar vein,
Ni 'lamme dibaouez, d'ar foultr dreist e gein.
Gand kemend a imor, ha kemend a herr
Ma ne zoñje nikun 'oa poent mond d'ar gêr.

23 - C'hoari mouchadeg

An hanter ahanom, a rede da guzad.
Ar re all a lakee, dindan eur bern dillad,
Gourvezet pe buchet war flourenn ar prad,
Eur paotr pe eur baotrez, a vije kuzet mad.
Ha pa veze ganto, echu o huziadenn
E redent d'o zro, en tu-all d'eur vodenn,
Hag e hopen t: " kèg ! "...Ar re all a rede,
Hag en eur dostaad, pep hini "barie.

En-dro d'ar bern dillad, e klaskent gand evez,
Piou a helle beza, eno, war e hourvez.

Evid klask o dalla, o zacha a-dreuz
D'an hini 'oa kuzet 'veze cheñchet neuz.
Evid ober brasoh, dezañ war e gein,
'Veze lakeet taouarh, bouteier, pe vein.
Evid dalla muioh, ha luzia an traou
'Leh unan, a-wechou 'veze kuzet daou.

Chom a ree ar gounid gand an tu 'deue a-benn
Da zivinoud piou a oa er guzadenn.

Mad pa hwitent warnañ euz a-drég ar harz
E save redadeg, hopadeg ha c'hoarz,
E-keit ma tifoupe, a-zindan ar bern
Gidig, Paol pe Bèrig, tomm ruz e gern.

24 - Labouseta

Ha komz a rin deoh euz al labouseta
Méd d'ober an dra-mañ 'ranker kaoud finesa.

Yon deom a lavare : ÇÊNa zistrujit ket
Al labousedigou hag a vez bepréd
O kluka en douar, kemend all a breñved
A ra droug d'ar plant hag a skign ar hleñved.
Distrujit, ma karit, skouled, fraoed, brini,
Sparfilli ha dristi, piked ha klujiri...ÊÊ

Setu petra 'glaskem ; end-eün e oam tig
Eun tamm bazig forheg, outañ daou laz-tig
A oa eun arm dispar, evidom-ni toud
Da vond da jaseal, laboused ken droug.
Méd ne reem peurvuia, gand eur seurt c'hoariell
Nemed ober dezo tehed a-denn-askell.

Med da baka driski, n'eus ket gwelloh tu,
Eged mond er goañv, e-kreiz an noz du,
Pa hwéz kreñv an avel kement ha ma hell.
Hag ar mor o trouzal war an aochou pell.
En ho torn kemerit, letern ha penn-baz,
It a-héd ar hleuziou dindan avel vraz
Troit mad ho koulou ouz goudor ar hleuz,
Bezit prest da lopa gand ho penn-baz beuz.
Gand goulou al letern, an dristi 'vo dallet
Hag a jomo ouzoh, a-bann kaer da zelled.
C'hwí 'hello skei warno, ha ken brao o faka
Ha ganto, da houde, pegen c'hwég frikota.

Méd amañ, adarre, evez mad ma karer,
Rag e toull an ode, c'hwi 'hell kaoud eun archer.
E-leh paka dristi, c'hwi eo a ve paket,
Ha kaset d'ar prizon, 'hed an noz da gousked !

ÇÊHa pa bakit dristi, eme, Yon, arabad
E ve deoh o has da werza d'ar marhad.
Hervez am-eus klevet, kalz a jaseourien,
A zo bet, er-mod-se, paket gand archerien.

Archerien adarre ! Pebez diaoulou fall !
Eme Saig ha me. Biskoaz kemend all ! »

25 - Gozeta

Gand Yon-Gorr or-boa desket penaoz paka gozed :
Klask war ar relachenn , war an douar kaled
Eur riboul goz flouret, a-dreuz eur wenojenn.
Lakaad war ar riboul, a-haoliad ha kempenn,
Dent digor eur griked antelled a-zoare.
Stanka mad gand leton, penn-da-benn, war-horre.
Dond goude d'he gweled, beb mintin, beb noz.
Mond ha dond 'ra eno, meur a wech ar hoz.
Beb minitin ez aio da arad er park.
Diouz an noz e teuio, en-dro euz al lark.

Ral e vo da eur hoz, ma vez mad ho trap
Tremen dre ar riboul hep beza paket mad.

Ar gozed, o arad, da baka 'zo êzet.
Eun taol seul war-lerh, ar riboul 'zo stanket.
Ne jomo da houde, 'vid gelloud o faka,
Nemed buan-buan, kabalad da doulla.

Med pa zav ar hoz he douar a-vernou
E vez kalz diêsoh he faka a-wechou.
Gand eun taol pal don, e helloh marteze,
Dizouara 'nezi hag he laza goude.

Med pa vije paket, réd e oa dioustu
'Vid diskrohenna gouzoud mad an tu ;
Staga gand poentennou, ar grohenn stennet
Ouz eur planken ledan, 'vid ma vezo sehet,
Gand eur meudad holen da vira da vreina..
Eiz devez war-lerh, ni 'helle he gwerza.
Charlig a Leslaou o frene diganeom,
Eun tamm brao a arhant a goueze ganeom !
Hag ar hregin gozed a oa prizet braz

Da ober mantilli d'an intronezed vraz.

Ar hiz a oa neuze gand ar merhed "prop"
Da zougen mantilli greet "en peau de taupe".

26 - Dourig mouar

Koulz ha n'eus forz piou, ni 'ree tra-pe-dra.
Ha morse ne jomen heb ober netra !
"C'hoari pe labourad " setu or ger-stur.
Aze 'hellit gweled, e oam paotred fur.
Petra 'hellem ober ?: Kement 'oa en or herz
Hervez on oad neuze, hag hervez on nerz.

Med pa rankem dastum ar patatez-moh,
E vijem, peurvuia, gwall ziñz da loh;
Beza leun a vouillenn, puchet war an douar !...
Gwelloh kalz e kavem, redeg da glask mouar,
A welem heoliet, ha meür ouz an drez.
War al labour, neuze, nebeudig a brés.

- ÇÊMamm! ni o- eus sehed ! Sehed braz on-daou !
D'ar gêr, ni a garfe mond da gerhad traou. »
- ÇÊPa vo echu ganeoh ! » a glevem kerkent.
Pe c'hoaz da vihanna, pa vezoh eet da benn.

Neuze, ni a gabale, ha ganeom echuet,
D'ar gêr, ni a rede da glask beb a vured.

Dour enno ! ha mouar ! sukr ivez dioustu.
Ni 'dorre or zehed gand dourig mouar du.
Med 'leh mond er vured, lod mad euz ar frouez,
A veze lonket kentoh a-ziwar an drez.
Da houde e chome livet or muzellou
Ha dindan or friou eur haer a vourennou
Ken livet, heb gevier ha muzellou ar plah,
A glask kaoud beg ruz, 'vel hini ar voualh.

27 - Kaohkezega

Respet deoh, tud keiz, mond da gaohkezeka
'Veze deom-ni, en hañv, eun dra euz ar c'hweka
Ouz va hleved amañ, OÊ! na hoarzit ket.
N'ez eus war an douar, micher zod ebed.

Yon-Gorr e-noa reñket, da Zaig, eur harr bihan,
Peder rod, eur hased, eur pez gwigour gantañ
Ni a zache warnañ war-bouez eul las-stoup

Hag ar harr a ruille ‘n eur ober “ploup-ploup”
Gand eur bladenn houarn, ni 'garge beb eil.
Ha pa veze leun-bourr, ez eem d'ar bern teil.
Er parkeier leton, e-touez ar peuri glaz,
Ni a gave ivez, karradou braz-braz.

Evel-just, er goañv, ne hellem e nep poent
Ober eur seurt micher : re brieg an hent.
N'ouzfeh hirio kompren, pegen fall an henchou,
A gaved d'ar houlz-se, war-dro an Ogellou !
Henchou leun a vouillenn, a zour, a fankigell,
Ken ez ee ar rodou, beteg kill ar bendell.

'Vid diwall an henchou, da garga or boutou,
Ni 'gave er parkou e-leiz a ribouliou,
Ribouliou a rede, kamm-digamm, a-dreuz,
Euz eur park d'egile, hag a gleuz da gleuz.
Med e meur a leh, red e veze diwall,
Ha kerzed a-lammou, euz eur mên d'eun all.
Hag ouspenn, aliez, e teuem d'an ti,
On dillad kaillaret, or botou leun-bri.
Nag a boan, va Doue, o-deze or mammou,
O tifanka goude ha loerou ha botou !..
Hag e huanadent : ÇÊSellit pebez gwiskad!
Peleh 'ta moh bihan ez oh bet o turriad ? »

III - TREDE PENNAD

29 - Ar skol

Abredig kenañ om bet kaset d'ar skol,
Da di ar Seurezed.. Feiz! ni a gave drol !
Rankoud chom azezet war eur skaon, tud keiz !
Rankoud kroaza ‘n divreh ‘tre daou benn an deiz !
Bastrouillad eur haier, pe eun tamm mên-glaz,
Heb gelloud kaozeal, na c'hoari cheñch plas,
Ha hopal asamblez ‘vel yer goude dozvi;
“Un, deux, trois, quatr 'cinq“, pe “ a, o, u, bo, bi “
Kleved al leanez, o parlant, o youhal,
Hep kompren netra, ha deom goud kaozeal !..
Pa zave beh warnom, 'leh mond ouz ar hleuz,
Pe a-dreg eur vodenn, evid ober on reuz,
Mond en eun toull teñval, leun brein a hwez fall,
Hag eun toull du heuguz ! Biskoaz kemend all !!!

Méd, a-nebeudigou, e teujem avad,
Da gompren eun tammig, ivez da zoñvaad.
Eur seurez or-boa, chentil kenañ ouzom,

Heñvel ouz or mamm; a gaozee eveldom !
Ha deom 'ouie konta istoriou ken brao,
Ma vijem dirazi fur eston atao.

Kerkent hag or zeiz vloaz, ni a zo bet kaset,
Da di ar skolaer... Ni neuze 'oa paotred !
Allaz Saig ! neketa ! ar skol-ze evidom
'Oa eun dra dinatur ! digernez, eur prizon !
Ha c'hoaz, diwezatoh, pa deujem da vrasaad,
N'ez eas ket, er poent-se, an traou war wellaad.

D'or pennou e vanke êr vad ar parkeier;
D'on treid, d'on divesker, dour red ar prajeier.
D'or skouarn e vanke, kann laouen an evned
Hag ivez d'on lagad, ar meziou glazvezet...
Rankoud terri penn war levriou galleg,
Ha paka ar vuoh pa gomzem brezoneg,
A veze evidon neketa, Saig paour,
Eur vuhez kasañz, eur vuhez dizaour.

Ahanta ! Yon-Gorr, nag e vezem laouen,
Pa hellem a-nevez, azeza 'n ho kichenn.
Ho skol-c'hwi 'oa deom-ni, an hini nemeti
A leunie or halon, dre ma oa anezi,
Eur skol greet evidon, hag hervez an natur,
E langach or mammou, on langach krouadur !

Koulskoude ne ouieh, na lenn tamm, na skriva.
Kalz gwelloh ho-poa : furnez, skiant-prena.

30 - Daou labourer

Ha ped ha ped servij a rentem d'on tud ?
Edo neuze digar, ar hrisa brezel yud...
Eet e oa ar wazed, pell-pell d'an emgannou.
Va zad din-me ivez, ha re all a gantchou.
Med Tad Saig, kosohig, a oa chomet er gêr,
A drugarez Doue : Mil bennoz da Zant Pèr.

Ar vugale, neuze, a ranke abréd,
Kregi da labourad. Sikour verr bepréd.
On hini a oa dister. Med se ne ree forz.
Atao ni firbouche er park pe er porz;
Drailha boued d'ar zaout ha panez d'ar hezeg,
Kas ar zaout er-mêz, o diwall er foeneg;
Kregi en o fenn, keit ha ma relachent .
Karga war ar hravaz yeot trohet er bradenn;
Kas ar marh Morian da Yon ouz an alar,

En e di pe du-mañ, pa droed an douar.
Pe c'hoaz tenna kolo evid kas d'ar hraou,
War ar memez krogad o sach a on-daou;
Trei an diennerez d'or mammou a-wechou ;
Harpa an orolaj pa zaved he foueziou;
Mond war-lerh ar yar, ha pa veze paket,
Gweled gand ar biz hag hi he-doa dozvet.
Ha pa veze mamm o horo ar zaout
Mired ouz al leue da vond kuit d'ar haloup,
Ha ni 'wel sent bihan,'pad ar memez amzer,
Gand or mamm e veze, desket deom or pater.
Ar haz du, Minousig, gand eur vaz kraoñ-kelvez
A bake diganeom, pa veze o laerez.
Plijoud a ree dezañ, lêz klouar ar zaout,
Ha d'ober kement-se, atao 'veze maout....

Setu eul lodennig euz ar pezh a hellem,
Saig ha me on-daouig, 'vid sikour or herent.
Pa ne oam d'ar mare nemed daou gornandon,
Hag a-veh bragezet, med dija daou lampon.
D'ar houlz-se, ar baotred, evid dougen bragez,
A hortoze gwall-bell ! hep gaou, meur a vloavez.
Ped vloaz or-boa-ni, pa oam bet bragezet ?
Pevar, a-dra-zur, pe krog en or pempved.

Pebez devez braz 'vije d'eur mous bihan,
Pa veze gand e vamm lakeet bragez dezañ !
Redeg a ree neuze, euz an eil d'egile,
Da ziskouez e beñsou, ennañ leun a fouge.
A-wechou, koulskoude e vije én egar
Pa veze, er bragez, re stard e ziuoharr
Hag e ouele doureg, hag e klaske c'hoaz,
Ar zae 'ouie floura e zivesker noaz.

31 - Perrukenner

Ar hosa eñvoriou 'zo chomet em spered,
Eo gweled va zad - A-veh e oan bragezet -
Bep sadorn da noz, o vond da vourk Kleder,
Da droha bleoiou, e-giz perrukenner.
Goude pep sizunvez, er park o labourad
Ar vicher-ze dezañ a oa war ar marhad.

En eun tamm speurenn a-dre kein ti Zaikou,
Tonto Chob hag eñ, a boanie o-daou,
Evid pevar gwenneg da lemel o baro
D'ar wazed a gare ha d'ar baotred fâro.
Abréd, bep sul vintin, e vezent c'hoaz eno,

Ha meur a wech om bet o selled ouz outo.

Plijadur or-beze o weled va zad
O frota saonètèz, leun-leun a hwez-vad,
Ouz an dremmou barveg, a bike evel lann,
Pa lake warnezo, eonenn gwenn-kann.

Distro euz ar brezel, e lezas da goueza,
Eur vicher a zebre e vareou gwella.
Med er gêr ne nahe, ouz hini biskoaz,
Touza, pe divarva, evel ma oa boaz.
War an daol e lake, 'n eur hased atao,
E oll vinviachou, ennañ reñket brao.
Ha ni, Saig ha me, on-daou dre forz selled outañ,
On-doa desket ivez, ar vicher-ze gantañ.

32 - An ti-forn

Bep sizun, da verher, mamm a veze boaz,
Da vond d'an ti-forn, gand eur harrad toaz.
Nag e vijem laouen pa hellem mond ganti;
Eur wech beb eiz devez, e veze pep hini,
Pep kontre d'e dro, én ti forn o poaza,
Rag neuze, pep ti, a farde e vara.

An ti-forn-ze a oa, én tu-all d'ar bourk.
Ni 'wele ar fornier, o planta 'n e forn,
Forhadou lamm-keuneud, a zeve gand flamm,
A vrohe, a vroude, gand eur mell baz kamm.
E-keit-se, ar merhed, o divreh én noaz
Troñset o mañcheier, a farde o zoaz ;
Mellou boulou ront, bleudet o hosteziou,
Ha moullet warnezo, pep hini e verkou,
A vo gand ar fornier e kov an toull kraz,
Dre eur bladenn troad-hir, lakeet brao 'n o flas.
Eno e velenent, war al leurenn horet,
Ouz gwrez ar glaou ruz, ha kan skiltr ar grilled.

En devez da houde, warnom 'veze prés,
Da vond d'an ti-forn, da gerhad bara-frésk.
Hag e teuem d'ar gêr 'n eur grignad kreun kraz
A sklake etre on dent, dre ma tañvem o blaz.
Ar bourhiz, d'ar mare, treudig o heusteuenn,
A glaske eun tañva euz on torziou melen.
Ha pa gasent ganto, re vraz diskolpadou,
E vezem er gêr, gourdrouzet, a-wechou.

Méd penaoz nah outo eun aluzenn vara

Péd oa neuze warno ar brezel o waska ?
Ha penaoz ne vije, or halonou tener,
Pa welem dirazom, naonègèz ha mizer!

Eur harrad toaz: Er memez karr e vez toaz oll dud ar hontre

33 - Kloh galv ar brezel 14

Eun devez, Saig kêz, soñj ho-peus marteze,
Bim-baon kloh an tan, 'barz an tour a zone,
Ha dre-oll, an dud, e peb leh a ouele.

Edom er park leton, o tiwall ar zaout.
Ne ouiem ket petra 'oa oh en em gavoud.
- « Ar brezel, eme Yon, bugaligou geiz,
Eo a strink e strafuill, hirio war or Breiz.
- ÇÊAr brezel ? emezom. Petra eo an dra-ze ?
Ar wech kenta 'oa deom da gleved kement-se.

- ÇÊAr breze !! eur gwall dra. Mond a rank ar wazed,
Pell pell d'en em ganna, du-hont, ouz ar Boched...ÊÈ

Hag ar hloh a zone, gwasoh-gwasa én tour,
Hag euz an daoulagad e rede an dour...
C'hweh vloaz n'or-boa ken, med or spered bugel,
Ne gomprenne tamm, petra 'oa ar brezel.

Nebeud amzer goude, OÊ! soñj mad am-eus,
Ar merhed a ouele...OÊ! na pebez reuz !
Tonto Chob da genta, a rankas kimiada
Edon c'hoaz em gwele, pa deuas din da boka.
Eiz deiz diwezatoh, va zad paour d'e dro
A rankas deom ivez, lavared kenavo !
Pegen goullou goude, e oa deom peb leh.
Na c'hoarz na plijadur, gand dén, e nebleh.

Med, da dad-te, OÊ! Saig ! eur chañs eo bet deom
A-drugarez Doue, a jomas ganeom.

34 - Maro va breur bihan (1915)

Me am-boa eur breurig
Koantig 'vel eun êlig
A ranken luskella
Pa stage da ouela.

Ha te, Saig, war ar bank, inouet,
A hortoz e va breur da gousked.

En e gavellig gwenn,
Va breurig ken laouen,
Ne zerre lagad...
ÇÊ O! kousk 't,a Jan-Mari
Ma 'z in-me da hoari
Gand va hamarad. »

Ha me a luskelle,
Ken ha ken a foultre
Ar bugelig kêz.
Med kerkentig avad,
Ma serr e zaoulagad
E lammen er-mêz
Ha ni a hoarie
E-keit ha ma kouske
Ar bugelig kêz.

Eun deiz, euz va gwele, me 'wel 'n eur zihuna,
Stouet war ar havell va mamm baour o ouela.
'N he hichenn, diou dindin a zelle truezuz,
A gomze goustadig, o-diou karantezuz.
Tennet euz va gwele gang Tintin Renea,
'Oan kaset d'an ti all, kerkent hep dalea.
Ha din 'oe lavaret, eva va hafe dous,
Mond goude da hoari, méd diwall d'ober trouz.

Pa zistrois d'an ti, 'oa mouchet ar prenest,
Hag a-zioh ar havell 'oa stignet dantéléz,
Hag a-bep tu dezañ, gouleier o skedi,
Ha mamm ha merhed all, e-kichenn o pedi.
Va breurig, gwenn kann, 'n e neiz dantelezet,
Serret e zaoulagad, a oa 'vel moredet.

- Ç Ro eur pok d'az preur », eme din va zintin.
Ha dibrabet ganti, d'e vuzellou mibin,
E rois eur pok stard, méd e zremm a oa yén,
He ne hoarze mui, ha ne hoarie kén.
Me 'stagas da ouela, rag spontet 'oan bet.
- Ç Ro peoh, 'eme tintin, da vreurig 'zo eet
Gand an Aotrou Doue, d'e varadoz skeduz,
Eno ema bremañ, o c'hoari gand Jezuz. »

Antronoz 'oa douget 'n eur arched gwenn-kann,
D'an iliz, d'ar vered. Ha te, Saig, dirazañ
En da zillad kaerra, a zouge ar goulou,
Ar beleg o kana, pedennou, kantikou.

Ha me ouz dorn mammig, eur vantell zu ganti,
A hirvoude doureg, o koll va Yan-Vari.

36 - Fin ar brezel

‘Vel eur ganevedenn, e strinkas ar helou,
Lugernuz, laouen, a-zioh an oll zellou:
Ç Sinet eo ar peoh, echu eo ar brezel !
Lakeet eo da vad, an tennou da devel ! »
Edom on-daou er skol, soñj mad am-eus c’hoaz,
Ha kroget da skriva, evel ma oam boaz.

Pa zonas ar hleier, ‘vel eur mor dirollet,
Da heul or mestr-skol, ni 'redas pennfollet,
Beteg an ti-kêr, da youhal kén laouen,
N’ouzon ket a-walh, ped ha ped kanaouenn.
War or han e strake ar hleier war vole.
Levenez a darze, an dud en em boke.
Biskoaz n’or-boa tañvet eur joa ken braz all ;
Echu eo ar brezel ! fin 'zo d’an tan-gwall !
Ha bremañ, bugale, kit d’ar gêr da hoari,
En enor d’ar viktor, gounezet ganeom-ni.

En eur vond d’ar gêr, d’ar réd en eur gana,
Ni 'gavas e Toull Broud, Fani Goz o ouela
O ouela d’he daou baotr, kouezet war an dachenn,
Hag ar zoñj anezo a waske he anken.
Ped ha ped mamm all, a welim evel-se.
Ganto 'kreiz an tan, kollet o bugale !
Listenn ar re varo a zo hir e Kleder.
Pegen mantruz soñjal ‘ve kén braz o niver !

En deiz-se, levenez ha joa, en em weske
Ma chomem dilavar an eil hag egile.

IV Pevare pennad

36 Tantad Sant Yann

Kloh an noz war vole. Poent eo mond d’ar gêr...
En deiz-se, ar chatal 'ranke lakaad herr.
Rag edo an derhent euz pardon Sant Yann.
Hag evid an tantad eo red pourchas lann.

Kerkent, goude koan, pep hini 'bak e forh
‘Vo sammet a geuneud ha douget gand lorh.
Ar sammou pounnerra a vo ar re wella !
'Vid tantad Sant Yann, n’eus ket da varhata.

Al lann a zo berniet, e-kreiz ar strêd veur,
Etre Kastell-Dero, hag ar Feutenn-Veur.
Ha pa grog an noz, goustad d'en em astenn,
En eur votez koad, e pak Yon eur hlaouenn.
Sin ar groaz da genta, hag an tan o kregi.
An tantad a-béz 'zo bremañ o tevi,
O strinka tro-dro, elfennou ha tommder
Ma rankom pellaad diouz kement a herrder .

Diwar gein eur hleuz, ni ar vugaligou
A zelle a-bell, da weled tantadou.
Pehini ar brasa ? ar bourk pa Toull-Broud ?
Pont Yegeu ? Kerfichan ? Ni o gwele toud.
Ped a oa anezo. Edont a-bep tu.
Evel mellou stered, e-kreiz an noz-du.

Bihanneet an tan, pep hini a dosta,
Pa n'eus mui a riskl, e teuje d'o rosta.
Neuze, an dud vraz, a bak ar re vihan,
Hag a zioh an tan, eun "tan-a-nao" buan.

Ar baotred 'n o divreh, a zoug plahed kran,
D'ober brañskelladig a-zioh flamm an tan:
Dre-oll, nag a drouz ! cholori ! c'hoarzedeg !
Ar merhed o redeg, o kuzad el lanneg...

Dorn-ha-dorn a-wechou, diwar roud én-dro,
E kanem kantikou, e tansem dañs-tro.
Ar re goz, a-gostez a zelle gand evez,
A hoarze o weled on laouenidigez.

Pa n'eo mui an tantand, nemed eur bern glaou
E krog Yon gand doujañs da lared ar grasou.
Hag en-dro d'al ludu, puchet war al leton,
Pep hini ahanom a bed a-greiz kalon.

Louzaouenn Sant Yann, bét én tantad rostet,
Tro-dro d'an daoulagad a vez neuze frotet.
Ha pep tiegez gantañ gand respet a gaso
Eur hlaouenn entanet, hag er puñs he zaolo.

Kloh an noz: An anjeluz diouz an noz -

Tan-a-nao: Ober nao luskadenn a-zioh an tan.

Ar hlaouenn-se taolet er puñs a vire ouz an dour da zond da veza fall, pe kontammet.

37 - Ar foenn

Da vare gouel Yann, en Ogellou, bep ploaz,
E trohed ar foennou, gand nao pe zeg gwaz.

E-touez ar falherien e veze Yonn-Gorr :
- “Tomm e vo an devez. War an deiz e vo gor “
A gleved abredig: Falherien o tond;
Dre greiz ar banellou, diskenn a reont pront,
A-raog an heol mintin, da foenneg ar prad.
Sin ar groaz da genta, beh goude da vad !

Ar foenneg a dregern, gand ar mên-higolenn
A réd en eur gana penn-da-benn d'al lemmenn
Pep falher 'zo kroget... an dég falh a dro.
Diwar bouez o divreh, foenn a gouez bep tro,
Astennet a-reñkou, war ar bradenn hlép ;
A-wechou, er foenn stoket, ar falz a jom spég.
War-lerh ar falherien, diou roudenn o boutou,
A weler er bradenn garanet a-reñkou.

Da fuilla e vannou an heol a zo kroget.
C'hwezi 'ra pep falher, glép-teil korv e roched.
War ar falherien, gléb-tour-teil o c'hwezi,
Eur forh gand pep hini, ar foenn glaz a nij,
Hag a-forz lavigad, on divreh a skrij.

Saig ha me gand pod-dour, a beb eil, béb eur
A gerh dour d'ar wazed : dour fresk Feunteun-Veur.
Pep foenneg 'vo falhet a-benn fin an deiz,
Hag ouz taol da goan, e vo joa e-leiz.

Med ar pezh evidom a blije ar gwella,
Eo ficha foenn trohet, keid ma vez o seha.
Eur forh koad 'n on daouarn, ni 'lakaer ar foenn,
Da nijal 'vel koumoul, beteg dreist or penn.
Da hortoz ma sehfe, ni 'helle forz pegeid,
C'hoari en em ruilla, diarhen on treid,
War gorv on rochedou, ganeom tokou kolo.
Méd, a-raog an noz, pep hini a grogo,
Da heul ar re vraz, do ober rizennou
'Vid gelloud lakaad ar foenn e kalzennou
E-keit ha ma rede, dre-oll, penn-da-benn,
Ha don en or friou, c'hwez mezhuz ar foenn.

Deiz ar charreadeg, kalz tud euz ar hontre,
Koulz merhed ha gwazed, da zikour a deue.
Diboulla a ranked gand ferhier pe berhenn,
Ha ganto e veze dibradet pep kalzenn.

Dougen gand perhennou 'oa labour ar gwazed.
E-leh ni, ar voused, a oa laouen braz
Da zikour ar merhed, ganto koefou-Baz,
Da zastum ar foenn, hag a jome fuillet,
Gand restell koad-skañv, hir-hir o bizied.

E-keit-se, ar hirri, a zizah ar foenn seh
War al leur, a-ruillou, en eur ober beh.
Hag eno e save, prestig eur mell bern
Ront kaer e gosteziou ha flouret e gern.

Foenn stoket: Foenn re zruz, bet aladet war ar prad.

Distrewi: Led ar foenn war-lerh ar fallherien -

Pod-dour : a vez distaget “potour“.

Koefou-Baz : Koefou heñvel ouz re Enez -Vaz, a vez douget e Kleder d'en em vired
ouz an heol da boaza an dremm.

37 - An dorna

Tad Saig a gustume ober meur a vicher.
Bez' 'veze ivez, béb hañv, mekaniker.
Eun dornérez e-noa, hag el leuriou tro-dro,
Da zorna an éd, 'veze bemdeiz en-dro.
Kalz éd a oa neuze. Ne gaved artichaot ,
Kenkoulz ha brikoli, nemed tostoh d'an aot.
Hag ouspenn ar gwiniz, e oa heiz ha kerh;
Gwiniz-du eun tammig a veze war-lerh.

Yon 'ta, a lavaren, e-noa eun dornérez :
Dornérez dre gezeg, “manêj “ ha fichérez.
N'o gweler mui hirio. Eet int oll d'an teuz,
Koulskoude, me 'lavar, dezo, me 'm-eus keuz.

O na pebez devez, pa weled el leur,
Yon ar mekaniker, ar mekanik d'e heul !
Oh heul ar mekanik, Saig ivez dalhmad,
Penn-da-benn an devez, a veze gand e dad,
Ha me atao gantañ, kalz ennon a foug
Gwir vekanikerien 'oam on-daou, me 'grede.

Plasi ar mekanik a yoa eur gwall afer.
Yon a anaveze, pep leur ha pep karter.
Du-mañ 'oa al leur, meinek ha diskompez.
Setu 'veze réd kompeza gand evez :
Uhellaad an tu-mañ, toulla an tu all,
Planta strapou houarn da zerhel diwrall,
Lakaad eün pep barrenn, hag o staga stard,
Ouz dent an oll rodou, planta leun a lard.

Ouspenn 'vije réd, lakaad warnañ a-dreuz,
Eur mellad mên, tennet diwar gorn ar hleuz.
Lakaad an dornérez, kompez mad dreist-oll,
Hag ivez a-resed, fichérez ha taol.
Goude 'vije gellet sternia ouz ar bannou,
Eiz loen skoaz-ha-skoaz ha staget daou-ha-daou.
War daol ar “manèj” e vije ar haser,
Gand e skourjez lér, prest da loh pa garer.

Dija, Saig ha me a oa o tivega,
Eur mellad kalkuad, ar mandos o koueza.
Ouz taol an daboulin, e lam Yon e dog,
Ha goude sin ar groaz, e kri : “Tro er rod ! “
Fouet ar haser a sklak : “hey 'ta Yell ! hey Fany !
“Ale ! deom 'ta, deom !... Hey Rouan ! hey Rouan ! hey 'ta, hey !“
Ar rodou a loh ; pep sugell o starda,
Ar hezeg o trei buannoh-buanna.
An daboulin a dro, a hourdrouz, a voud,
A zun eur vandosenn, he debr, he lonk toud.
Yon Gorr eo ar boueter, hag e klever ingal
Ar greun aour o strinka, an houarn o tintal.

Pep hini ‘n e blas, al labour 'ya én-dro.
Bannou ar fichérez a zislonk dre ma tro,
Berniou kolo frésk 'zo dibradet kerkent,
Gand ar gwella gwazed, diskabell o fenn.
Ar merhed a zach gweñv war rozellou koad,
A hej o balaennou, tro-war-dro d’o zroad.
Ar greun a zo douget, e-barz ar hrañj tosta,
Hag ar pell 'zo kaset er park-hir da wenta.

Goude eun eur labour e vo cheñchet kezeg;
Eiz loen all a hortoz e-skeud ar harz laneg.
Evel-se 'vo greet teir rolladenn 'benn lein.
Meur a hini neuze a zav laouen e gein.

Beb an amzer e teu merhed euz an ti
Ganto gwin ha gwér, hag ivez odivi.
- “Ahanta Fañch koz ! eur banne hini mad,
“Da ziskenn ar boultrenn ha d’ho laouennaad.“
Ha Fañch koz a eve, lommig goude lomm,
Ha pa roe ar werenn ‘n en gave ‘n e blomm.

A-benn fin an devez, ar holoeg a veze
Uhel mad e gein, Mik ha Paol war-horre.
Yann, gand ar forh hir, a zibrade sammou,
Raktal war ar bern, ingalet a-dammou.
El leur nag a gabal !. Fin an deiz a zo tost.

Euz an ti, én avel, e nij c'hwéz ar rost.
- “Ne vim ket diwezd, eme Yon d’ar Born !
“Lavarit d’ar merhed pouurchas mad ar peurzorn.”

Gwasoh-gwaz e vlèj genou an dornérez,
Hag an abardaez a greñva he mouez.
Euz toull an daboulin e sav poultrenn louz.
Dallet eo ar merhed, bouzaret gand an trouz.
Hag a-henaouadou, an tammou diweza
A zo lonket neuze...Echu eo an dorna.

a zach gweñv (gwevn): Sacha mord, stard - (

39 - Ar peurzorn

Ar merhed e hèj ar gwiskadou poultrenn
Diwar o bleo hir ha diwar o lostenn.
Tro-war-dro d’ar puñs, ar baotred a gav gras
Distana o fennou, e dour al laouer vraz.

Adarre e weler, bremañ war al leur,
Paotred yaouank faro, merhed koant evel fleur.
Da hortoz ar pred e vezo c’hoarzedeg
Hag èr holo frésk, jestrou ha ruilladeg.
En-dro d’ar bern kolo, ni 'hoari koukoug ;
Med pa reom re drouz, e pakom war or chouk.

Sioul eo an amzer, ha dispak al loar.
Euz ar hrañj brik ruz eo bet tennet ar harr,
Ha gand eur skeul hir ha daou pe dri blankenn
Ez eus gallet eno, sevel eun daol gempenn.

Soubenn war an daol, rata, kig-ha-fars,
Gwin ruz ha gwin gwenn, hag ivez leun a hoarz.
Ni ar vugaligou, ne gollem ket on lod,
Ha koulz ha forz piou e kasem loa d’ar pod.

Marvailloù a veze pe c’hoaz rimadellou.
Med ivez 'vel-just, chañsoniou ha gwerziou.
Hag evid echui, eul lomm lip-e-bao,
Hag en noz da houde leun a huñvreou brao.

Lip e bao: Likoriou, banneou traou - mad.

40 - Aradeg

Pa veze aradeg, e vijem dalhmad
Kaset dre ar hontre da glask sikour vad.
Ar hiz a oa neuze, el labouriou kaled
D'en em zikour atao, evel breudeur garet.

Abréd diouz ar mintin, kerkent ha goulou deiz,
E park ar warenn vraz ez eus gwazed e-leiz.
Yon a grog én alar, ha kas a ra da benn,
Bommou flouret ingal hag eün evel eun tenn.
Mond kempennig, e zell ouz ar bomm
An alar a wigour, d'ar hezeg eo tomm.
Ken ingal e sachont, ken reiz ez eont d'ar paz
Ma 'z eus lorh ennom-ni, karget on-daou d'o has.
Koulz arer ha Yon Gorr a ve diêz' da gaoud ;
En oll aradegou ez a gantañ ar maout.

Ar souheller a zo etre daouarn ar Floh.
Ken kreñv eo e zivreh, ma oar ken brao e loh.
Tri loen a zo outañ hag a oar labourad
Gand Nan ha Paol Lorañs int bleniet ervad.
Dalhmad, a-hed an deiz, sklak o hourjez lér.
Sentuz ouz o mouez, ar hezeg a lak herr.
Mord eo ar zugellou, sutal a ra ar zouh
Klevit 'ta Nan Lorañs pegen nerzuz e youh !
Urziou krak ha berr a glever euz a bell :
Ç Diha 'ta Morian ! So Penngwenn ! hey 'ta Yell ! »
Hag e skourjez hir a nij, a zut, a sklak.
Dindan nerz ar hezeg, ar souheller a strak.
Dibrada 'ra douar, ken founnuz, war e gein,
Ma skrij divreh ar Floh pa dremen war ar vein.
Pa vez e penn ar park, dizolo e skouarn,
E weler o lintra, kroken flour an houarn.

Dispar eo an amzer ha laouen ar wazed.
Sehi a ra buan, an douar nevez aret,
Skrabet penn-da-benn gand pep seurt laboused.
Marellet eo ganto, an douar labouret
Mond ha dond a reont, skrabad en eur wikal,
Pigosad ar buzug, lammad ha gournijal.
Dreist ar park e tremen bandennadou tridi.
En o mesk, o kaoagal, e klever ar brini.
Pa vo hadet ar park, e vezint bagadou,
A-héd an irvi fresk, o skrabad an hadou.
Evid mired ar greun war-lerh an hadérez
E ranko pep hini beza mad war evez.

Gwall domm eo d'ar hezeg, warno an eonenn
A red dindan ar stern, penn-da-benn d'o hrohenn.

Dre ma sachont ingal, c'hwezet o fronellou,
E wigour ar wakol, al lér, ar zugellou.
O faoiou houarnet a grap en douar noaz
Ken e plad gand ar beh ar wakol war o skoaz.
Maodez hag an Iv, war gorv o rochedou
O-deus c'hoari a-walh o terri ar pennou.

Ouz an daou du d'ar park, ar gwagou douar frésk
Dre m'ah astenn an deiz, a ya buan war grésk,
Evel tonnou ar mor, o hounid a-lammou,
Dre ma sav an dour glaz, trêzenn war an aotchou...
Pell a-raog ma sono añjeluz ar serr-noz,
E park ar warenn vraz, al labour a vo kloz.

41 - Ognon

Eul labour a garem eo dilosta ognon.
N'ouzoh ket marteze, evid peseurt rézon ?
Pa vezem bet fur, pa ouezem poania,
Evel ar re vraz, da zikour dilosta,
Ni 'hell a-wechou, paka brao an dro
Da vond da gas ognon, beteg porz Rosko.

A-raog ar zav-heol e lohe ar hirri.
A-veh 'welem sklêr, pa zave or girri
War horre eur harrad, divorfil ha seder,
Hanter gousket c'hoaz an dud e bourk Kleder.

An hent a oa hir, méd ne skuizem ket,
Rag evidom neuze, pegen kaer ar béd ;
Pignet war eur harrad, dég all war e lerh,
Nag a lorch e veze, er paotr pe er verh!
Euz eul leh ken uhel, ni a helle gweled,
Dreist ar hleuziou lann, ar vro en em ledet,
Beteg ar mor glaz, o krozal en tu kleiz.
Ni a wele ivez touriou kaer e-leiz :
Sibiril, Plougouloum, Kastell ha Rosko
Ha re all 'vel Santeg pelloh diouz or bro.
Goude Kastell zokén, e welem ar mor
En daou du d'an hent, soñj e-peus Saig Korr ?

Méd al leh marzusa evidom on-daou
Eo dirag ar porz-mor... Nag eno 'oa traou !
Er porz hag er ruiou ne oa nemed kirri.
Ha war ar mor neuze ! Pebez mor a vigi.
Bigi hir ha ledan, ha gwerniou ken uhel
Hag an tour uhella bet gwelet e Kastell !
Kement 'oa anezo ha kement zoken,

M'ho-pije lavaret, eur hoad netra kén !

Hañ feiz ! Saig ha me, krog e penn ar hezeg
On-devoa sur eno, 'vid ouspenn dég kwennek !
Ne vije klevet nemed kezeg o pavata,
Marhou o hourichal, kerdin o wigoura...
Ne welem kennebeud, nemed tud o fringal,
Sahadou o ruill, laboused o nijal...

Biskoaz biken - jamez ne vijem-ni bét
Gand muioh a vuhez, skoet gwech ebéd.
Ni a zispourbelle spontuz or bigorniou,
Or genou ganeom ken digor ha fornou.
Ha pa vezem distro, Saig ha me on-daou,
Feiz avad ! ni 'helle konta eur bern traou !

girri : diouharr.

bigorniou : On daoulagad digor evel bigorniou.

V - Pempved pennad

42 - Ar wetur dre dan

Hirio mui ne heller bale war hent-praz
Hep gweled o tremen kirri-tan bep paz.
Pa 'oam, Saig ha me, daou fri louz ken bugel,
War ar poent-se, pep tra 'oa disheñvel.

An "Aotroumobil" evel ma lavarem
A oa ral-kenañ war-dro or bourgadenn.
Eur park or -boa-ni, war bord an hent-praz.
Pa labourem ennañ, pa glevem trouz braz,
Ni 'ouie ober gaol ha sevel war ar hleuz
Da weled o tremen ar harr leun a reuz.

Setu-eñ o tond, gantañ eur jolori !
A sponte a bep tu, ar piked, ar brini,
A strake, a vramme hag a vramme c'hoaz,
Flêr spontuz ouz e heul ha poultenn ken gwaz !
Digor e speurennoù d'ar glao ha d'an avel,
Ken digor e gein, dizolo, diskabell !

Gand ar foultr e teu - "Plas d'an Aotroumobil !
Karr Paolig an diaoul ! Plas 'ta d'al loen vil !"

Ar hezeg a fringe, kén e oa eur spont.
Réd e vije buan lammad prim ha pront
Er -mêz euz ar hirri, 'vid kregi en o fenn.

-”Oeñ! ha oeñ ! ha oéñ ! din-me eo an hent !“
- “O ! O ! chom 'ta ! chom !“. Ar marh a lamm a-dreuz
A ru, a gil, ha...del ! ar rod e-barz ar hleuz.
Neuze, 'veze karnaj war gein ar harr brammer,
E-keit ha ma klasked tenna 'r harr a zañjer.

43 - Ar Marh du

Daou di-gar oa neuze war zouarou Kleder ;
Er bourk unan braz, Lanveur unan dister.

Treñ Lanveur ganeom 'oa anvet treñ ”fagot“
Ablamour ma treine kalz bagoniou “chafod“
Hag e veze warno leun a herdin keuneud
Evid an Arvoriz hag o-doa re nebeud.
Euz a-bell her hleved gand an avel izel.
Nag a boan pa bigne an torgennou uhel !
“Tou - kou, tou - kou - dou - kou“, eme ar marh du.
En eun taol 'ree kazeg hag e kile dioustu,
D’an traoñ a-benn-herr, ’n eur strinka glaou kriz,
Da vond d’an tu-eneb da gemer e diz.
Réd e vije neuze lakaad war e raillou,
Grouan ha trêz groz oa dezañ ‘vel krapou,
Da zewel ar ”menez“ da vond dreist e gern...
En tu all avad, pebez herr ‘n e hern !
Erruet e Ploueskad, penn e haloupadenn,
E ruille dour bero, penn-da-benn d’e grohenn.

Med a-bell ma klevem klemmou treñ Lanveur,
Treñ ar bourk a welem kement ha beb eur.
Hemañ 'veze gantañ nebeutoh a ardou,
E hent 'oa kompesoh, diriskloh e raillou...
Patatez hag ognon, aliez leiz e gov,
Ha tud forz pegement euz a benn d’e lost.

Eiz treñ, pe war-dro, a dremene bemdez,
Pe o tond euz Kastell, pe deuz tu Trelez.
Gar Kleder evito, a oa eur hroazhent
Rag-se 'ta e welit, ne oa ket eur fent.
Lavared 'oa or gar eun “extraordinal”
Kemend a dud enni, ma n'helle den fringal.

An treñ eo a verke, evidom an eur,
Pe hini bourk Kleder, pe hini Lanveur.
Eur zutadenn amañ, eur vlejadenn a-hont,
Ha setu ar poent, mond da derri naon,
Pe da gas ar chatal, pep hini d’he hraou,
Pe da vond d’ar skol, evid klevet traou.

Ped kwech om-ni eet, on-daouig gand mamm
‘Barz an treñ patatez, aon warnom eun tamm,
Pe da foar al Lukas, pe da varhad Kastell,
Ha d’ar gêr, ni 'deue, en eur zebri gwastell,
Eur gasketenn nevez, ganeom war or penn,
Pe eur boutou ler -goad, pe eur boutou prenn.

Yaouankiz ar hontre, da zul 'veze boazet,
‘Vid tremen o amzer, gweled kamaraded,
Da vond da eur an treñ, beteg an ti-gar,
Da gleved keleier, pa da weled kar.
Ha ni'rede iive da heul ar re all.
Da gleved kelachou, atao e vez mall.
Ha neuze, e hellem mond tost d’ar marh-du,
Da weled ar “chofer“ suliet a bep tu,
O planta glaou du, en eur pez fornigell,
Ar blenier o c’hoari gand nousped c’hoariell :
Rodou a beb liou, rodou a beb ment,
A droe - zistroe, a-raog mond én hent.

Pa loh ar marh-du, eun taol sut o wihal,
Hag eur mell rohadenn, a ra deom-ni skrijal:
C’hwezadennoù moged, evel koumoulennou,
Hag an treñ en hent, outañ leun a bennou.

Bagoniou chafod : Bagoniou plad hep toenn na kozteziou.

Hern: Liester ar ger houarn, pevar houarn ar marh: evel eur marh hag a oar dibrada e dreid, e hern.

Kleved traou: Beza gourdrouzet .

Outañ leun a bennou: Ar re a oa en treñ a veze o fennou ganto er-mêz dre ar prenester evid lavaroud kenavo.

44 - Erh

Da Zaig koulz ha din-me, e plije an hañv.
Evel daou vouch, ni a rede skañv,
Divoutou, diloerou ha troñset or bragou,
War gorv or rochedou, diskabell or pennou.

Ma kavem kasauz ar glaoeier bepréd,
Deom-ni, ar goañv kaled ne zisplije ket.
An erh, dreist pep tra ! an erh, pebez dudi !
Gweled e blu gwenn, o nijal, o kludi
War skourrou ar gwéz, ha war gein an tiez,
O helei an henchou, ouz o lakaad diêz.
Da vale war an dud vraz, med nann ‘vidom-ni,
Rag, ni 'rede warno, ken skañv hag eur hi.

A-wechou e kouezem, med hep kaoud re boan,
On daouarn goloet gand manegou gloan,
Ha war beg or friou eur gravatenn deo,
Or mire ken braoig ouz bilim ar reo.
Or bouteier koad, warno bourrou foenn,
A oa d'on treid noaz, arhou mad ken brao
Ma choment 'hed an deiz, tomm-kenañ atao.

Pa welem, el leur, teo an erh a wiskad,
Ni oll, en eur vandenn, a ouie kabalad
War-zu Feunteun-Veur, rag eno e oa traoñ
En-dro d'ar poull-kanna, euz an neh d'an traoñ.

Ni 'ree mellou boulou, hag o lakae da "roull"
Beteg ma frigasent, en eur goueza er poull.
Hag ouspenn, ni farde eur pezh bolom-erh
En eur glask rei dezañ, eur penn paotr pe verh.
A-wechou ar bolom, a veze eur paotr koz,
En e veg eur "bibenn", atao teo e gov...
Ha dao dezañ, goude ! boulou war e gein !
Kén e veze flastret, ha pladet gand ar vein.

Petra 'rajem c'hoaz ? Moulla war an erh
On dremmou dizolo, ha pep hini war-lerh
Leiz e gov da hoarzin, pa wel bég e fri
Moulet war an erhenn.. Neuze nag a gri!

Arh, arhenn, arhou : Koufr.

45 - Skorn du

Muih eged erh, deom-ni oll, ar baotred,
E plije ar skorn, ar skorn teo ha kaled.
Ken kaled ma hellem warnañ a bep tu,
Rikla a-benn-herr : An dra-ze 'oa skorn-du.
Soñj mad am-eus c'hoaz, euz ar bloavez seiteg,
Bet eur goañvez spontuz : eur miz leun a skouleg.

Da zutal, ar skoliou ! skornet ar pod-liou !
Da sklasi war bankou ! piou a yaje ? Piou ?
Saig ha me a fringe, war an hent kaledet
Moien bremañ warnañ, da zañsal, da reded...
Gand Yon on-doa desket, penaoz en eun taol krenn,
Treuzi 'n eur rikladenn, ar poull pe al lenn,
Hep goueza na tumpa, nag a-raog, nag a-dreñv
Méd atao, chom war-zao, stard ha plomm, sonn ha kreñv.

Ar gwas a enebour d'an holl rikladennou,
A veze evidon tachou lemm or boutou.
O fennou re veget, a roge ar skornenn,
Hag a-fardigleo, ni 'bake atoudenn.
Setu 'ta ma tennem, en despet d'on tud,
Gand begou or hontell, an tachou re yud.

Paotrezed, a-wechou, a riskle war on lerh,
Med bep tro e ruillent, da hounid o herh.
Hag o haravellou da nijal, paour-kêz !
Ma c'hoarzem-ni dezo, ha m'o-deze méz.

Skouleg: Skorn.

Eun atoudenn: Paka eur gernad, eur gwall daol, eur gwall lamm.

Gounid e gerh a vez lavaret euz eul loen kezeg pa en em ruill war an douar ; amañ,
koueza war greiz ar hein, an divesker er vann.

O haravellou : o divesker

46 - Beilladeg

Edo en Ogellou, deiz braz ar veilladeg,
Ha buan ha dillo eo bet koan dibradet ;
"Kabalit 'ta, merhed, da walhi an traou,
"Ma vezo lavaret, hebdale, ar grasou !"
Da genta e veze lennet "Buhez ar Zent".
Ha gand ar pedennou, kroget goude kerkent.
Hirig mad e vezent. Va mamm o lavare,
Ha ni oll daoulinet, devod, a responte.
Goude, ni 'hortoze an dud d'en em gaoud,
An dud euz a Lezlaou, beteg tiez Toullbroud.
War ludu an oaled, kefiou teo dindanno,
Devi 'ra goustadig eur bern mouded tano.
Va zad war e biltos, er hogn 'zo azezet,
Dindan ar vaz anduill, e zremm sklérijennet.

Setu Yon o tond, d'e heul ivez Saig Korr.
Digoret ha serret e vez aliez an nor.
A-raog pell e vezo karget tro an daol
Ha neuze e sklako ar hartou bep taol...
Pevar all azezet ouz eun daol a gostez,
A hoari domino 'n eur sklakal hep paouez.
Cholori 'zo en ti, ha levenez dre-oll !
Pep cheu a ya en-dro, ha dén ne garfe koll.
Deom-ni ar vugale, or plas eo lost an ti ;
Nag on-eus plijadur ! eno nag a gri !...
- "Ahanta, eme Yon, eun taol bide partoud ! "
- "Ar maout a zo ganeoh ! an tri all a zo boud ! "
Rannet e daou-hanter, ar pevar imoret

A hoari hep diskrog, beteg dég eur sonet.

Méd, réd mad eo paouez, war al ludu aze,
‘Vid an oll ez eus beb a vanne kafe.
Braz ha bihan p'o-deus, war-lerh eun devez poan,
Da gloza beilladeg, gounezet eun askoan.
Bolennou 'ta Soazig, ha kafe d'an dud,
A-raog mond da gousked, pep hini d'e glud.

Bide: eur pik hepken a vez greet bide anezañ.

47 - Ar mor

Lavared a heller, e welen ar mor,
Heb lavared gaou, diwar dreuzou va dor.
Med al linenn hlaz a welen en dremmwel
Ne lavare netra da va spered bugel.
He hemer a reen evid liou an Neñv,
Hag an tarziou gwenn, koumoul gwenn ivez.

Pegen mantret on bet, soñj mad am-eus c'hoaz,
Er wech kenta m'on eet, beteg ar mor braz.
Evel diou vrennigenn, me a zispourbelle
Braz-braz va daoulagad, a-zirag ar gwél-se.
“ O ! sellit nag a zour! Na pegen braz poull !
Ne heller ket gweled an tu-all d'an toull ! “

Da zul, Saig ha me, ha kanfarded all
Pa veze re domm, on-deveze mall,
Da vond d'ar mor glaz da lammad én dour,
Da redeg dre-oll, a-héd an trêz flour.

Mond a reem war droad, goude ar gousperou,
Aliez 'n eur vandenn, diwar-dro ‘n Ogellou ;
Eun hanter vale ‘vid mond d'ar porz nevez.
Nag eno e tañvem, plijadur, levenez !
Gwelet 'veze neuze, pehini ar gwella,
Da lammad an tarziou, war e benn da genta.

Lod a wihe skrijuz, pa zantent dour yén
O hilliga dezo, o hov-garr hepken.
Ha ni 'grie warno: “ A 'ta merhig paour !
“N'az-peus ket a vez ? Kaoud aon rag an dour ! “

Ni a glaske deski neuvel ar pesked;
Méd war ar c'hoari-ze, ne oam ket gwall zesket !
Ha buan inouet, e teuem da skuiza ;
Gwelloh kalz e kavem, mond da hoari spluja.

Dastum a reem ivez, ‘mesk ar bizin glaz,
Da zebri d’or merenn, brinikennou braz.
Méd ne vezent morse, gwall êz da zistaga ;
El lano koulskoude, 'oa êsoh o faka.
Réd e vije neuze, teurel evez, paotred,
Rag kenkoulz or biz ‘hellfe beza paket,
Evel teod ar haz, pa 'z eas da vrennika.
Kalz êsoh e oa, mond da rigadella.
En trêz ar rigadell 'vez êz da gaoud.
Evid koueza warno, Saig 'oa eur maout:
Eun toullig en trêz, 'vel eun toullig brochenn :
Turiad buan eno, ha c’hwi 'gav eur glorenn.

Deuet euz an dour, ni 'ouie kabalad,
‘N eur grena ‘vel deliou, da wiska on dillad.
Ha goude d’ar haloup, da eva or hafe,
A-raog mond gand ar zaout, da bradig Sant Ke.

Ar haz o vrennika: Eun istor eo houmañ hag a veze kontet d’ar vugale : eun deiz, eur haz a yeas da vrennika. Lakaad a reas e deod dindan eur vrennigenn diskloz. Paket e oe, avad, stard, etre ar roh hag ar grogenn. Ne helle ket en em zispega, hag e vleje : “Va lez ha me da lezo - Erru ar mor hag or beuzo.”

VI - C’hwehved pennad

47 - Ar zul

Ni on-doa abredig, desket hent an iliz.
Nag on-dije kavet, a-dra-zur, gwall iskiz,
Gweled paotr pe verh, krennard pe grennardenn
Ha ne 'z aje ket bep sul d’an overenn.
E Kleder, d’ar mare, ne vanke dén ebéd,
Da renta da Zoue, an dever a zo dleet.

Nag e kavem brao, son skiltruz ar hleier,
P’én em lede bep sul, a-zioh ar parkeier !
Nag e plije deom, an aoteriou bleuniet,
Ar gouleier skeduz, an dillad alaouret !
Nag e plije deom diskan ar hantikou,
Puchet ouz ar balustr hag uhel or friou !
Nag e oa eun dudi, hent an overn)bréd
Ma kerzem warnezañ, niveruz, d’ar réd,
Laouen kaer or pennou, gwisket fou atao,
En on treid, o sklakal, boutou gwenn koad fao,
Warno killou melen ha tachouigou keur,
Evel bleuniou balan pe kaluriou fleur.

Méd ar zul evidom, kaer dreist ar re all
A oa sul ar bleuniou. N'ez oa ket eun all
Hag he-dije bet, deom-ni, bugaligou,
Merket war on ene, padusoh eñvoriou.

Sul ar beuz, O Saig ! Klev 'ta, soñj e-peus,
E reden d'ar haloup, du-ze da glask beuz ?
Ha da dad a deue, dindan ar wezenn skao,
Da droha evidon, bodouigou brao !
Nag e veze kaer, hent an iliz goude;
Bodou gand pep hini, tud vraz ha bugale !
Gand pebez levenez, e tibradem uhel,
Or bodou, en iliz, da reseo dour santel.

Raktal goude lein, nag a brés er baotred;
E pep leh, eur bodig, ganeom 'veze lakeet,
En ti, er solierou, el leur hag er hrevier,
Er parkou, el liorz, ha c'hoaz er foenneier...
Morse 'héd ar bloaz n'en em gavem brasoh :
Edom 'vel beleien, oh ingala bennoz.

Puchet ouz ar balustr: Plas ar vugale neuze, e iliz Kleder, a veze ouz ar balustr pe an daol zantel.

47 - Pask ar vugale

Vakañsou dudiuz e veze evidom,
Paskou ar vugale, ha joa vraz d'or halon.
Soñjit 'ta, tri devez, hep skol tamm ebéd !
D'al lun eo e kroge, hag e lohem abred.
Paotred ha paotrezed, ni a ranke hasta.
Med, goude 'n overn, ni 'helle 'n em baka :
Mouchennou bara fresk, gand eur banne kafe,
On lakae da fringal, e ti Berrin Fave.

Din-me, ar sarmoniou, a blije dreist-oll.
Istoriou a veze, ha ni 'hoarze orroll .
Ha war ar hantikou, nag e sachem seder !
Tregerni 'ree ganto an iliz, e Kleder !
Or hantik a blije, deom on-daou, ar muia,
Eo kan an "Añjeluz " anvet "alleluia ".

Goude 'hellem c'hoari, tro-war-dro d'an iliz,
E-barz ar vered koz, enni leun a frankiz.
Hag er vered-köz-se, a-zindan gwez glaz,
Ni 'helle galoupad, ha bihan ha braz.
Gwez uhel 'oa c'hoaz penn-da-benn d'ar vali,
A gase d'ar vered plas warni da hoari.

D'ar gwez-se, d'ar vered, atao em-eus keuz.
Douar sakr ha santel, hirio pebez reuz !
Douar bet kemmesket, gand eskern on tud,
C'hwi bremañ 'vez breset gand al loened mud.
Evel-se a-dammou, ez a gand an avel
Feiz karet on Tadou, hag o giziou santel.

Goude fin ar zalud, an Aotrou Person koz
A lavare deom-ni : “ Bremañ, diouz an noz,
“En eur vond d'ar gêr, larit ho chapeled.“
Hag en eur zistrei, ni 'bede a gevred.

D'ar yaouvez war-lerh, na pebez gouel braz !
An nozvez 'veze hir kemend on-doa hast !
Paotrezed an tri bask 'veze oll e gwenn,
Med re ar pevare, a zouge war o fenn,
Evid ar wech kenta, koefou dantelezet.
Neuze e paouezent da veza paotrezed...
Enno en em gave, neuze, ken braz fouge,
Ma sellent gand fae ouz an oll da houde.

Echu an overenn, e veze lein vraz.
Ouz taol an Ogellou, re nebeud a blas ;
Tontoned, tintined, e-leiz a gendirvi,
A genitervezed, a garge an ti.
Kig-ha-fars a veze, debret gand an dorn
Leun ennañ a rezin, hag ivez fars-forn.

Gousperou a ganem, war don krampouez gwiniz.
Prosesion war-lerh, tro-war -dro d'an iliz.
Dre ar hreiz e kerze, reñket daou-ha-daou,
Ar re a oa anvet da zougen an traou :
Delwennou ha kroaziou, bannielou e-leiz,
A fiche, a skede, ouz sklêrder an deiz.

Distroet d'an iliz, ni 'gane 'bouez penn;
Ha goude e lakaed ar gwella da lenn.
Eur baotrez da genta, hag eur paotr da houde.
En iliz didrouzet, ni 'oll a zelaoue...
Ar hantik diweza gand an oll diskanet,
A jomo em spered, da viken garanet.

Orrol: Kalz - kalz.

49 - Ar Pellgent

Ar pellgent ! Ar pellgent ! O na kaerra nozvez !

Gortozet atao, gand kemend a hirnez.
Evid ar vugale, nozvez visteriuz,
Nozvez a levenez, ha nozvez dudiuz.

Beilladeg a veze, da hortoz an eur.
Kartou ha domino, a sklake béb eur.
Med, a-raog e veze, lennet Buhez ar Zent,
Hag ivez e komun, lavaret ar bedenn...
Askoan, a-raog lorch : bara fritet, silzig,
Aozet gand or mamm, war bladenn ar billig.

Ha dao ! én hent, goude, warnom dillad tomm.
Er gêr, en nozvez, dén ne gare chom.

An iliz 'zo leun ! beh eo kavoud kadoriou !
Tostig eo an eur : tan er hantoloriou !
Setu Jean-Louis Hloher, gand eur vaz penn-tan,
O tond da elumi, boujiennou kran.
War eun toullad ruillou, evel paraillerou ,
Staget a-zistribill, a-uz kaer d'or pennou.
Gantañ 'veze tanet, eur fiseleñ wenn,
Ha drezi e rede an tan penn-da-benn.
Ha dirazom, mantret, eun toullad gouleier,
A skede 'vel stered, a-zioh on eurieier.

An ofis a groge : Kurusted leiz ar heur,
A-bep-tu d'an aoter, goloet oll a fleur.
Pa sko hanternoz, beleien, kurusted,
A zoug ar Mabig Jezuz, en eur hraou preparet...

Ar pellgent a zo hir, méd ni a oar kana,
Héd an teir overn, ar hantikou kaerra.

Distro euz ar pellgent, ni 'lamme 'n or gwele,
Evid koueza kerkent, e bro gaer an huñvre.

Ni a veze eüruz, 'n eur zihuna goude,
O kaoud war ar bank, e-kichenn or gwele,
Eur mabig-bihan sukr, en-dro dezañ êlez
Ha da zebri gantañ, eur gouign rouantèlez.

Ruillou pe kelhiou braz e keur (kouevr) a oa neuze a-zistribill ouz solier an iliz ha war ar helhiou-ze ez oa eur bern piledou, pe boujiennou. Ar ruillou-se a oa heñvel a-walh ouz ar parailler a zerviche du-mañ da lakaad al loaiou, hag a oa a zistribill a-zioh penn an daol

Euriou - eurier: Levr, leor. Pa vez kalz e vez lavaret: eurieier.

50 - Kraouig Nedeleg

D'ar zulvez war-lerh, nag e vezem eüruz,
O vond oll da weled, kraou ar mabig Jezuz.
Atao deom e plije, kraou ar Mabig karet,
En eur heur, a gostez, ken didiuz savet.

C'hwez ar pin, ar sapin, a leunie an iliz.
Stignet a-dreñv dezo, eur pezh taolenn iskiz.
Kraou ar Mabig Jezuz, a zave, er hreiz,
Ha dre-oll, er glazter, deñved gwenn e-leiz ;
Ganto 'veze sachet, sellou ar vugale;
Pastored o c'hoari, ha re all war vale,
A zelle a-bell, ouz ar Mabig-Bihan,
Sant Jozef ha Mari, o veilla warnezañ.
'N e gichenn, gourvezet, eun ejen penn rouz,
Hag eun azen bleveg, gand diskouarniou touz,
A glaske laouenig, gand êzenn o alan,
Tomma e zaou zornig en eur hweza warnañ.

Ne skuizem o selled, rag bepréd evidom,
E veze da weled, traou nevezoh-eston,
Pe menezioù uhel, erh gwenn war o hern,
Pe ouz bodou sapin, rubanou a-vil vern.
Pe c'hoaz, eur ster arhant, melezeur o skedi,
Warnezi o neuial, bandennou houidi.
Tro-war-dro e veze, a-bep tu, a-guz,
E podou gwér livet, gouleier tan ruz.

Ar bed-se dirazom, nag e skoe or spered,
Ha beteg an Neñvou, hen lake da reded.
A-raog kimiada e vijem aketuz,
Da rei eur gwennegig d'eun êlig sebezuz,
Gand diouaskell arhant, hag a ouie bep tro,
Soubla brao e bennig, da lared "Kenavo".

Taolenn iskiz: An daolenn-ze a oa evid kuzad an aoter. Warni ez oa livet gwez palmez, en-dro d'eur gêr vraz, hag a dlee beza, moarvad, Betleem. Iskiz pe souezuz e oa an daolenn-ze evidom, abalamour d'ar gwez palmez ha da furn an tiez, disheñvel krenn diouz on re-ni.

Ar podou eo a oa ruz, leun e oant a eoul, gand eur vechenn entanet

Ster arhant : Ster greet gand gwér melezeur.

51 - Kalanna

War-lerh gouel Nedeleg, e teu ar bloaz nevez,
Evidom, bugale, setu c'hoaz eun devez,
Hag a veze ivez gortozet gand mall.
Or gounid, en deiz-se, ne veze ket fall.

En devez 'raog, tintin Mên a lare:
“An hini 'vo kenta, o soueti din-me,
“En-devo daou wenneg, ha d’ar re all unan“
Daou wenneg d’ar houlz-se, d’ar vugale vihan
A oa eur zom vrao, hag a roe c’hoant...

Goude, diouz ar mintin, ni 'gabale drant !
Ne veze ket ezomm d’or zacha er-mêz.
War bep hini laouen, 'vije kalz a brés.

Ar re oll a welem, a gleve ganeom
An tammig rimadell a oa desket deom.
Arhant toull a goueze, e foñs or godellou.
Pokou brao da heul, ha kouignou a-wechou.
D’ar gêr, ni 'zistroe, laouenig hag ardant,
Goude tro ar hontre ‘n eur gonta an arhant.

Or gounid: Roet e veze gwenneien deom da galanna.

Setu-amañ ar rimadell-ze : “Eur bloavezh mad a zouetan deoh, kalz re all ouspenn, ha joa ar baradoz da fin ho puhez“ - Hag e veze respontet deom atao : “Me a zouet dit ivez“

Ar gwenneien, neuze, a oa eun toull en o hreiz.

52 - Evid kloza

Etre Saig ha me, a-wechou all c’hoaz
E veze marvaillou, evel gand tud vraz;
Soñjit 'ta, va zudou, ni a wele mad,
Dindan or fri mehi, ar bleo oh hirraad.
Ne gredem ket anzav, evel ma ree Mik,
Edo en or skouarn, krog dija ar bik.
Nemed, ni 'varvaill, gand muioh a skiant
Pegwir ne oam mui, daou gornandon bihan.
Ha dija e soñjen en amzer da-zond
Ha diwar gement-se, ni drohe kont.

Eun devez, on-daou, e koadig Sant Ke
Edom brao azezet. Glaz kaer oa an Neñv.
Eun tamm e oam skuizet, o klask mouar du
Da helloud marvaillad, e klaskem an tu.

Goude eur pennadig, el leh-se, ken klouar,
Da Zaig, me 'lavaras en eur zebri mouar :
“Petra 'ri-te Saig, pa vezi deuet braz ?“
Saig a daolas warnon e zaoulagad glaz :
- “Me 'raio evel Mik... Klask a rin dimezi !“
“Dimezi ! dimezi !...Neuze Saig e ranki

“Mond da glask eur vaouez; hag e kavi unan ?“ ...
 - “Hag e rin, emezañ, en eur hoarzin buan.
 - “Kredi 'rez ‘ta Saig eo ken êz-se kaoud ?
 “Daoust ha war ar poent-se, e vefes eur maout ?
 - “Ma lavarfen dit em-eus unan kavet !!!“
 Neuze Saig a hoarz, ouz va gweled mantret.
 “Ha gwir ? Ha gwir Saig ? Piou eta eo honnez ?
 “Lavar din dioustu, lavar din ma hellez !“
 Saig a zav e fri, gand eun êr souezuz.
 “Gwelloh ganin gedal, an dra-ze 'zo siriuz“
 “Hag eo euz ar hontre ?” - “ Marteze. Kee 'tao!“
 “Unan vraz pe vihan ?“ - “Kred mad, unan vrao!“
 “Hag ez eo ganin-me, anavezet mad ?“
 “A-dra-zur, ez eo, kredi ‘hellez ervad.“
 “Hag e-peus-te neuze, disklêriet da hoant ?“
 “D’an hini a gavez, ken brao ha ken koant ?“
 “O! nann ! n’em-eus ket, nemed, me 'wel anad
 “He-deus honnez c’hoant, skrivet eo en he lagad.
 “Selled a ra ouzin, hag en eur vousec’hoarzin,
 E kinnig din laouen, bleuniou kaer he jardin...
 “Honnez a blij din, n’out ket gouest da gompren,
 He daoulagad glaz, hag he bleo melen...
 “Hag e fell dit gouzoud p’hini eo va dousig ?
 “An hini a garan, honnez eo Mênig !“

O ! Saig Korr ha Mênig ! anaiou ken koant !
 O ! Saig Korr ha Mênig ! yaouankizou drant !
 Oll on-eus-ni bet, e-kreiz on yaouankiz,
 Tañvet ho c’hoariou, levez ha frankiz.
 Me 'wel c’hoaz ahanoh, an eil ouz egile
 O vousec'hoarzin laouen, hag o leñva ivez...

Med morse moarvad, n’he-deus biken gouezet,
 'Oa eno eur galon, eviti o lammed.
 Biskoaz n’ez-peus gellet, penn-da-benn da vuhez,
 Rei d’ar plahig karet, ar pok a garantez.

Sammet out bet, Saig, falhet 'kreiz da vrud,
 Gand an Ankou dall, falher mud an dud...

Te a rankas ivez, ha te yaouank flamm,
 Mond pell diouz Breiz-Izel, mond pell diouz da vamm ;
 Da hounid da vara, te 'rankas kuitaad,
 Da vro ha da gerent, da garedig vad,
 Esper en da ene, da zistrei eun deiz,
 Da unani ganti da galon e Breiz.

Med, dent kriz ar vuhez, o waska da yehed,

O-deus a-nebeudou, da oll nerziou trehet.
Distroet out bet, Saig, en da di da vervel...
Da gleved 'ran c'hoaz, eun deiz ouz va gervel.
Hag edo an Ankou, war da gorv droug-livet,
Ha te ouz e falh, o klask en em vired...

Falhet out bet Saig ! Falhet prim ! ha padal
A-veh ma lugerne ugent vloaz war da dal.

Hag hi 'zo bet ivez, euz ar bed diframmet,
'Vel eur vleunienn zigor el liorz kutuillet,
Divleuniet didruez a-raog ar gliz-noz...

Ra vezoh unanet, e gloar ar Baradoz !

Mik ar Hastell - Dero, eun hanter vreur da Zaig.

Krog ar bik en or skouarn : a vez lavaret euz ar re a zo krog enno ar c'hoant dimezi.

Troha kont: Kaozeal.

Mên, Mênig: Filomên, Filomênig an ti -all.

Pennad kenta

- 1 - Yon
- 2 - Saig
- 3 - An draillerez lann
- 4 - Morian
- 5 - An toer
- 6 - Koan
- 7- Laboused
- 8 - Pardonioù
- 9 - Foarioù
- 10 - Laeron
- 11 - Bleizi
- 12 - An toull bleiz
- 13 - An distro
- 14 - Al lore a gan

Eil pennad

- 15 - Ar marh morian
- 16 - Ar zaout
- 17 - Fest ar vaz
- 18 - C'hoarioù
- 19 - Gourenedeg
- 20 - Siliaoui
- 21 - Cheu vraz
- 22 - Patati
- 23 - C'hoari mouchadeg

- 24 - Labouseta
- 25 - Gozeta
- 26 - Dourig-mouar
- 27 - Kaoh kezega

Trede pennad

- 28 - Ar skol
- 29 - Daou labourer
- 30 - Perukenner
- 31 - An ti - forn
- 32 - Kloh-galv ar brezel 14
- 33 - Maro va breur bihan
- 34 - Fin ar brezel 14

Pevare pennad

- 35 - Tantad St Yann
- 36 - Ar foenn
- 37 - An dourna
- 38 - Ar peurzourn
- 39 - Aradeg
- 40 - Ognon

Pempved pennad

- 41 - Ar wetur-dre-dan
- 42 - Ar marh-du
- 43 - Erh
- 44 - Skourn du
- 45 - Beilladeg
- 46 - Ar mor

C'hwehved pennad

- 47 - Ar zul
- 48 - Pask ar vugale
- 49 - Ar pellgent
- 50 - Kraouig Nedeleg
- 51 - Kalanna

52 - Evid kloza

